

# JEAN ROUDOT

## MARO SANT TREMEUR

.....

Jean Roudot

Bet ganet e Sant-Wazeg e 1871, ha marvet e Pennharz e 1921.

Beleg e oa.

Notenn : Eur bern faziou diwar-benn ar rannouigou-verb “a “ hag “e “ a zo. Reñket int bet. Faziou kemmaduriou a zo ivez, bet reñket. Galleg eo ereadurez ar frazennou meur a wech. N'int ket bet reñket.

Embannet e oa bet ar pezh-mañ e 1906.

Sed amañ da genta daou bennad, a zo e-barz “Buhez ar Zent”.

## **Santez Trifina ha sant Tremeur**

(Hervez “Buhez ar Zent“, gand E. ar Moal. *Modernnaet eo bet an doare-skriva*)

*Nebeud euz ar zent ganet en Arvotig a zo bet muioh brudet ha karet gand o henvroiz evid santez Trifina ha sant Tremeur.*

Gwerog a rene war bro-Gwened (500-550) : bez' e nevoa eur verh anvet Trifina ; kelennet gand sant Gweltaz, houmañ a oa eur skwer a furnez hag a zoujañs Doue. Ar hont koz hag a anaveze an treñzor roet dezañ gand an Aotrou Doue, a gare e verh dreist e vugale all, hag a glaske eviti eur stad uhel.

Konomor, roue bro-Garhaez, a welas eun deiz Trifina hag he c'hoantaas da bried, gounezet dre he gened, he furnez, marteze ivez dre ar c'hoant da gaoud kontach<sup>1</sup> he zad, da veza mestr da Vreiz. D'eun heveleb goulenn, Gwerog a deu spont dezañ : « Penaoz rei ma merh da falla den ar vro ? ». Rag Konomor, den didruez, difeiz, a laze e briedou, war lavariou faoz ar zorserien : « Diwallit, Konomor, emeze, gand eur mab deoh e vefet lazet ! »

Evid dalea, Gwerog a respontas da Gonomor : « N'ho-pezo ket ma merh Trifina da bried, ma ne deu an den santel Gweltaz<sup>2</sup> d'he goulenn en ho ano. » Galvet eo Gweltaz d'ar palez ; gand aon na zavje brezel etre an daou briñs, e lakaas Gwerog d'asanti.

Ne badas ket pell ar garantez a zeblante Konomor kaoud evid e bried yaouank. Trifina 'oa o vond da veza mamm d'eur bugel, ha Konomor na houle ket an enor da veza tad. Seled a ra bremañ a-dreuz ouz e wreg. Ar briñsez a rank soñjal tehel da di he zad : « O ! ma Doue, eme Drifina, pebez stad truezuz eo ma hini ! Mez ne dlean ket en em glemm, rag pep tra euz ho polontez 'zo greet evid ma evurusted. »

Beure mad ha didrouz, e tilez Trifina ar hastell ; mez hebdale ivez Konomor a glask e bried. Pa oar eo tehet kuit, gand kounnar e lamm war e varh, hag a-raog pell e tap en eur hoad Trifina. Nag he sellou glaharuz, nag he fedennou, netra ne denera kalon Konomor ; evel eur bleiz gand eun dañvad, dre eun taol kleze, e lemm digand ar briñsez he buhez.

Peleh e c'hoarvezas an torfed-se ? War douar parrouz Santez-Trifina, he-deus c'hoaz bez ar zantez hag he relegou.

War-lerh e dorfed, Konomor a red da Gastel-Finañss, savet 'uz d'ar Blavez<sup>3</sup>. - Servijerien a gas d'he zad kelou euz muntr Trifina. Gwerog a halv Gweltaz :

-« D'eur bourreo, a lavaras-eñ, hoh-eus roet ma merh ; ar bourreo en-deus he dibennet. »

-« Gloar a deuio da Zoue, eme Sant Gweltaz, euz ar muntr a ra ho klahar. »

Daoulina a ra ar manah dirag ar horv maro, ha goude eur bedenn, e lavar : « Trifina, en ano an Dreinded santel, me hen gourhemenn deoh, savit, ha bevit adarre. » Ha setu ar horv maro o sevel leun a vuhez evel gwechall.

---

<sup>1</sup> kontach : kontelez.

<sup>2</sup> Jildaz gand Roudot.

<sup>3</sup> d'ar Blavez : ar Blañoeh.

'Benn eun nebeud amzer goude, 'oe galvet c'hoaz gand sant Gweltaz da skuill dour ar vadiziant war dal ar bugel a hanas Trifina : « Tremeur, eme ar manah, a vo e ano ; evel eun êl e vevo ; evuruz e vamm hag e vro ! ».

Beteg an oad a bemp bloaz e chomas gand e vamm ; goude 'oe kaset d'abati sant Gweltaz, da Rhuis. Neuze Trifina en em dennas en eur manati leanezed, e leh ma varvas leun a veritou.

En berr amzer, Tremeur, desket gand sant Gweltaz, 'oa deut da veza eur bugel santel. Eur zulvez, an 8 a viz du 554, ma oa eet da vale war ar mêz gand ar skolaerien all, Konomor en em gavas gantañ, hag an tad digar a dibennas e vab evel en-nevoa dibennet e bried.

Parrouz antez-Trifina he-deus an enor da gaoud bez ha relegou santez Trifina ha sant Tremeur, he fatroned. Ar chapelig savet war o bez 'zo darempredet gand kalz a gristenien. E-pad miz mae, mammou ar vro a zegas o bugale vihan war o bez, ha meur a vugel o-deus greet eno o hammedou kenta.

Pardon ar zantez a vez greet an 21 a viz Gouere, devez berz evid ar barrouz. Pardon Sant Tremeur a vez lidet ar zul kenta a viz Mae.

-----

*(Hervez « Buhez ar Zent » gand Yann-Vari Perrot. Modernnaet eo bet an doare-skriva).*

## **Sant Tremeur**

### **Merzer (VI<sup>ved</sup> kantved)**

E hanter ar c'hwehved kantved e oa o chom war-dro Karhêz eur roue breizad, e ano Konomor. Tro on-deus bet da gomz anezañ dija estreged eur wech. N'oa ket eur gwall zen er penn kenta ; gwelet on-deus anezañ o rei douarou e leve da zant Gouenou, hag o tegemered en e di e niz sant Melar, p'edo o tehed diouz e eontr Rivold ; mez ar youl astenn e rouantelez a reas dezañ koll e benn.

Dimezet 'oa da intañvez Iona, roue an Domnone, he-devoa diouz he gwaz eur mab e ano Judual. Sevel a reas c'hoant gantañ da laza ar priñs yaouank-se evid beza e-unan goude-ze, mestr war an Domnone a-bez. Eun droiad ma oa eet droug braz ennañ e tizoloas e vennad d'e bried. Houmañ, dre guz, a gasas kerkent he mab euz al lez. Fizioud a reas anezañ e sant Leonor a reas dezañ mond da Bariz da lez ar roue Childebert.

Eur pennad goude, o veza deuet da veza intañv, Konomor a hoanteas dimezi da Drifina, merh Gwerog, roue Bro-Wened ; hag e kasas tud da ober ar goulenn. Mez Gwerog n'edo ket e chal da rei e verh da unan hag en-devoa klasket laza e vab, hag a damalled dezañ zoken maro Ioan, pried e wreg kenta. Lavared a reas n'oa ket da d'e verh dimezi c'hoaz.

Daoust d'ar respont-se, Konomor a gasas e hanterourien eun eil gwech da gaoud roue Bro-Wened.

Gwerog a lavaras neuze : « Konomor n'en-devezo va merh, nemed Sant Jildas a deufe d'he goulenn diganen evitañ. »

Jildaz a oa nao pe zeg vloaz a oa abaoe m'oa deuet da jom da Vreiz-Izel. Konomor a gasas beteg ennañ e dud. Jiladz a lavaras dezo : « Ho mestr, emezañ, a zo eur gwall zen, ma roan tro da Werog da rei dezañ e verh, ha ma vez lazet goude-ze, me eo a

vezo tamallet. Ar pezh a hellan da ober eo mond ganeoh da weled an daou briñs, da weled hag o lakaad a vezo gallet d'en em gleved. »

Ha setu-i en hent. Kaoud a rejont an daou roue o komz an eil gand egile. Werog a lavaras d'ar zant : « Biken n'en-devezo va merh, nemed lavared a rafes din he rei dezañ. »

Jildas, en aon na zigorje brezel etre an daou roue, hag o kredi e oa Konomor gwelloc'h eged na lavared, pe e helle beza deuet gwellaenn ennañ, a roas ali da Werog da rei dezañ dorn e verh Trifina.

Da genta e yeas mad a-walh an traou etre an daou zen nevez ; mez an amzer gaerze ne badas ket pell.

Werog a oa koz, ha pemp mab en-devoa. Konomor a glaskas lakaad e dad-kaer da ranna e rouantelez etre Makliou, ar hosa euz e baotred, hag eñ. Mez Gwerog ne asantas ket diranna e bevar mab yaouank.

Neuze Konomor, evid glaza e dad-kaer, a droas e gounnar ouz e bried Trifina, hi hag a zouge dezañ eur bugel. Houmañ, o weled pegement a zroug a oa en he gwaz, a dehas en e raog hag a yeas d'en em guzad en eur hoad e-kreiz ar strouez. Mez Konomor a redas war he lerh, a skoas anezi gand eun taol kleze, hag a laoskas anezi beuzet en he gwad.

Pa glevas Gwerog ano euz an darvoud a oa c'hoarvezet, e kasas buan kemennadurezh da Jildaz, hag hemañ a yeas da glask korv ar briñsez. Kaoud a eure anezañ skornet gand skorn ar maro, eur gouli euzuz en e benn. Ar manah santel a stouas en e gichenn, ha goude eur bedenn galoneg e lavaras a-vouez uhel : « En ano Jezuz-Krist, m'her gourhemenn dit, sav ahalese ha bale. » Kerkent an hini a oa eet dre ar vro ar vrud euz he maro, a zavas en he sav, a valeas hag a heuillas sant Jildaz da di he zad. An abad, ouz he rei da Werog, a lavare : « Setu amañ, leun a vuhez, an hini az-poa fiziet ennon. »

Eun nebeud devezioù goude-ze, Trifina a hanas eur mab a oe badezet gand sant Jildaz hag a oe anvet Tremeur. Goude-ze en em dennas en eur manati leanezed, hag eno e varvas e peoh ha leun a veritou. He mab a oe savet gand sant Jildaz e Rhuis. Evel eun êl ' oa e vugaleaj. Eur zulvez m'oa eet da ober eur bale war ar mêz, e dad en em gavas gantañ, ha dallet gand ar gounnar, e tibennas anezañ, evel m'en-devoa dija dibennet e vamm.

Ar vrud euz e zantelez, harpet war ar miraklou a zegouezas e-tal e vez, a en em skignas ker buan, ma kaver e ano gand hini e vamm, e litanioù ar zent a ganed e Bro-Zaoz e-doug ar VII<sup>ved</sup> kantved.

Iliz Karhêz he-deus ar hloar d'e gaoud da batron.

D'am Eontr,  
Person Sant-Tremeur, e Karhêz.

### **C'HOARIERIEN**

TREMEUR, priñs yaouank a wad ar Rouaned.

KONOMOR, e dad, kont-meur Breiz.

JILDAZ, abad Rhuys,

GWENHLAN, Drouiz-meur.

TALIEZIN, Drouiz yaouank.

ARMEL, mignon Tremeur.

FRIAL, GWALBRAN, RUZ-VARZ. : Drouized.

MENEH, - tri pe bevar.

DROUIZED, - pemp pe hweh.

SOUDARDED, - kemend all pe ouspenn.

E-kreiz eur hoad : eur pez dervenn, eun daolvên, meinhir ; war an daolenn, a-dreñv,  
eun draonienn don, meneziou euz an daou du ; pell-pell, e fin an draonienn, eun  
tammig mor.

### **D'AL LENNER**

Sant Tremeur a veve er c'hwehved kantved ; e vamm a oa santez Trifina, e dad ar  
hont Konomor, eun den-bleiz a lazaz ne ouezer ped euz e briedou gand o bugaligoù !

Relijion griz an doueou koz a rene c'hoaz d'ar mare dre ar vro ; o beleien, anvet  
Drouized, kaer o-doa stourm ouz prezegerien an Aviel, e troe arBobl gand ar re-mañ.

Ar giz a oa, gand an Drouized, pa ne yee ket an traou d'o doare, da ginnig e  
sakrifis d'o doueou gwad an dud gand bep seurt lidou !

Setu perag er pezh-c'hoari-mañ e weler Gwenhlan mestr an Drouized, o houlen  
gand Konomor e briedou hag e vugale da laza en enor d'an doueou, evid terri o  
hounnar prest da skei war ar Bobl, dre ma tileze ar relijion goz !

# Maro Sant Tremeur

## PENNAD A-RAOG KREGI DA VAD

**GWENHLAN**, Drouiz-meur ; **TALIEZIN**, Drouiz yaouank.

*(Ne weler da genta nemed Gwenhlan war an teatr ; bleo ha baro hir ha gwenn, hag e c'hoari gand e delenn, harpet ouz an deroenn)*

**GWENHLAN**, o kana

Setu an heol o tiskenn a-dreuz ar gwez dero,  
Droug-livet ha glaz e zremm evel dremm ar maro,  
Ha ruz koumoul ar huz-heol 'vel ar gwad tro-war-dro.  
Euz ar houmoul er mor don setu kouezet an heol,  
Ruillet 'vel eur penn anaon 'kreiz an tarziou diroll,  
Ken a skrij oh e weled ar bed oll gand horrol ;  
Setu an heol o tiskenn a-dreuz ar gwez dero,  
Droug-livet ha glaz e zremm evel dremm ar maro !

**TALIEZIN**

*a gan, heb en em ziskouez c'hoaz, mez o tostaad !*

*Dre oll e trid ar mêziou,  
Me glev an alhweder o kana ;  
War-nij dreist ar menezioù,  
Da hervel goulou-deiz da bara ;  
Tridal a ra va gwad e va spered,  
Kan dudiuz a voud em halon.  
Heol burzuduz, strink da sked,  
Ma tarzo dudi an deiz warnon !*

**GWENHLAN**

Setu an noz du dre oll oh astenn heh askell,  
Ha dindani kousket sioul bugale Breiz-Izel  
Hag evid ho luskellad, mouez ar mor o sevel !  
Setu, evid ho sponta, e kleuz ar goz dervenn  
O sevel a-dreuz an noz kri mantruz ar gaouenn ;  
C'hoant he-deus da lavared ne zihunfont biken.  
Setu an noz du dre oll oh astenn heh askell,  
Ha dindani kousket sioul bugale Breiz-Izel !

**TALIEZIN**

*oh en em ziskuez, drant o kana*

*Du-hont, wxar gern ar menez ;  
Setu-c'hwi o skedi, heol laouen ;  
Heol glan, deiz al levenez*

*Diskenn e strad teñval an draonienn !  
Pobl, o leñva e-kreiz noz ar maro  
Tavit, setu an heol o sevel ;  
A-dreuz da goajou dero,  
An heol a bar warnout, Breiz-Izel !*

### **GWENHLAN**

Taliezin, va mab, na laouen eo da gan ;  
Avi en-deus ouzit ar paour-kêz koz Gwenhlan ;  
Da gan a zo laouen 'vel kan an alhweder,  
Pa gouez ken fresk war boul ar galon, ma kreder  
E kuz, e peb notenn, eur berad gliz mintin ;  
Sevel 'ra d'an oabl glaz, ken sklêr ma kavfe din  
E strink gand peb notenn 'vel eur bann heol beure !

### **TALIEZIN**

Va han a zo laouen, va halon zo ivez ;  
Eun huñvre kaer deuet din a-berz Doue, me gred,  
Noz-deiz, hun pe dihun, a zalh war va spered ;  
Seblantoud a ra din, dre va huñvre, beza  
War eur menez uhel : an heol prest da darza  
Euz puñs an noz e pign gand diri aour e skeul  
Hag eur mor a sklêrder a bign, a bign d'e heul !  
E-keñver an heol-ze, an hini a oa kent  
War zouar Breiz-Izel o tistaol sklêrijenn  
Na vezo mui nemed eur hlaouenn peuzvaro,  
Outi eur flammig sked ha moged, bep eil tro :  
O hortoz an heol-ze da bara war an dud,  
Heñvel ouz an eostik a gan war skourr e hlud,  
Tra ma tosta an deiz ouz bordig ar menez,  
Va halon-me a drid, a gan gand levez !

### **GWENHLAN**

Evel dit-te, noz-deiz, me am-eus eun huñvre ;  
N'eo ket, siwaz ! sklêrder ha dudi ar beure  
A zav d'o heul em halon-me d'am frealzi ;  
Va huñvre 'zav gantañ eur mor a velkoni,  
Me, e-kreiz ar mor-ze, strinket ha distrinket,  
Gand an tarziou beb eil lonket ha dislonket,  
Va spered, kas-degas, euz eun eil spont d'eben<sup>4</sup>  
E-kreiz ar gudurun<sup>5</sup> hag an deñvalijenn !  
An heol santel, evel pa vije saouzanet,  
Ne hell mui kaoud e hent da bara war ar bed ;  
War ar zao-heol e chom an nor-dal serret kloz ;

---

<sup>4</sup> d'eben : fazi, gand levezon ar galleg. Gourel eo spont (egile).

<sup>5</sup> ar gudurun : ar gurun.

Goude an noz n'ez eus da hedal nemed noz ;  
Gand ar spont hag an naon, 'kreiz an noziou du-dall ;  
An dud evel bleizi en em zebr, 'n eur yudal !

### TALIEZIN

Ha petra, a gav dit, a fell d'an doueou  
Rei deom da anaoud dre ar seurt huñvreou ?  
Hervez ma 'm-eus desket, mestr, en da jentili<sup>6</sup>,  
Pa fell d'an doueou rei d'an dud eun ali  
E tegasont dezo huñvreou burzuduz.

### GWENHLAN

Evidon-me, 'm-eus aon 've darvoudou spontuz  
Prest da skei war ar bed ; erru eo, me a gred,  
An amzeriou skrijuz merket gand an Drouized,  
D'eur freuz a dle beza, - n'eo ket etrezom-ni,  
Krouadurien 'netra, savet euz eun tamm pri,  
Mez etre an doueou a zo a-uz d'or penn  
E bro ar sklêrijenn, o veva hag o ren !

### TALIEZIN

Daoust d'ar boan a ra din ar goumoulenn teñval  
A bign euz da spered, da zisliva da dal,  
Me ne hellan mired va halon da dridal ;  
Va halon 'zo enni 'vel pa vez o hedal  
N'ouzon peseurt dudi, evel pa vez e kuz  
Dorn eun doue, ennañ eur halir burzuduz,  
O kinnig d'am ene eun evach a hwez vad !

### GWENHLAN

*(O selaou eur han o tond euz a-bell)*

Tav ! Me 'ghev an Drouized o pignad gand ar hoad !  
Selaou euz an draonienn o moueziou kreñv heñvel  
Ouz trouz ar mor pa vez ar pardaez o sevel,  
Pa voud, e skoultr ar gwez, mouez an êzennoù noz,  
Pa leñv, dre ar mêziou, eneou on tadou-koz !  
An oll Drouized, am-eus galvet euz a bep tu,  
Dirag an daolvên zakr bremaig a vo erru ;  
Euz al leh santel-mañ, pa bigno or pedenn,  
D'or speredou teñval e teuio sklêrijenn ;  
Pep hini a hello, va mab, neuze gouzoud  
Petra 'fell d'an doueou rei deom da anaoud !

*(Chom a reont da zelaou an Drouized, a dosta 'n eur gana, war don Bosenn Elliant.)*

---

<sup>6</sup> da jentili : galleg. Jentil e vez ar mestr.



*Kaerra dervenn a zisheole  
Bro-Vreiz, euz eur mor d'egile,  
A oa war lein ar Yun-Elle !*

*Diskaret gand eun taol kurun,  
Ema war zouar yen ar yun,  
He halon goz e mil bruzun !*

*Dervenn, an tarz en da skoaz,  
A-uz d'or penn, a lugern c'hoaz  
E vroud tan 'vel eur hleze noaz !*

*Ouspenn gourdrouz ar hurunou,  
Pe kroz ar mor dreist d'an aochou,  
A glever hed an traoniennou !*

*Klemvan an eneou maro  
Gand ar gaouenn a nij an dro,  
Da greizenn gleuz ar gwez dro.*

*Moueziou a zav euz an douar,  
Moueziou a gouez euz an ear<sup>7</sup>  
O komz gand an traou dilavar !*

*Mouez, m'ho-pije bet, o ! traou mud,  
Na pebez spontusa burzud.  
Ho-pije disklêriet d'an dud.*

*(Dre ma kanont e tegouez an Drouized).*

-----

---

<sup>7</sup> an ear : an êr (distagadur Bro-Leon, evid ar rim).

## ARVEST KENTA

*Er henta arvest, Gwenhlan, an Drouiz-meur, en-deus dastumet Drouized ar vro oll evid en em glevoud ganto da laza Tremeur, hervez an doare merket gand an doueou !*

*N'eo ket a-walh d'ar re-mañ kaoud gwad Tremeur ; ar gwad-se ne dalvo netra ma n'eo ket skuillet gand dorn e dad, ha gand asant an oll Drouized gwitibunan ; ma vez greet ar zakrifis en doare-ze, neuze relijion an doueou koz a vezo saveteet er vro !*

*Mez setu Taliezin, drouiz yaouank, o sevel e vouez : ne asanto biken da eul lid ken kriz ; trei a ra zoken kein d'an Drouized, hag eun nebeud Drouized all d'e heul, evid mond da glask Tremeur ha d'e zivenn ouz ar maro.*

*Gwenhlan a zo mantret ; telenn zantel an Drouized koz a dorr etre e zaouarn ; ha kement-se a zo eur zin fall ; toui a ra ar beleg koz e teuio evelato a-benn euz e vennoziou ! Tremeur a vezo lazet, kousto pe gousto, hag an doueou koz a vezo mistri !*

### GWENHLAN, TALIEZIN, AN DROUZED

*(Gwenhlan er hreiz, ar re all, reñket en daou du)*

#### GWENHLAN

Peleh 'ma an tri Drouiz em-oa kaset o-zri,  
Dre hentchou Breiz-Izel, gand beb a gefridi ?  
Te, da genta, Frial, 'm-oa kaset da hervel,  
Evid sikour da vro, Drouized Breiz da zevel :  
Lavar peseurt respont 't-eus bet gand da vreudeur,  
Ha peseurt degemer da gannad an Drouiz-meur ?

#### FRIAL

Euz a vro Vreiz, Gwenhlan, echu ganen an dro ;  
Furchet ha difurchet 'm-eus kement korn distro,  
Euz a enezenn Sun beteg meinhir Karnag  
'Leh ma kreden vije kuzet eun Drouiz bennag !  
Rehel<sup>8</sup> ar mor warno an tarziou o tibun  
Re ar menez faoutet o fenn gand ar gurun  
Beb eil o-deus klevet va mouez kreñv o hervel,  
Da harpa ar Vamm-Vro, Drouized Breiz da zevel !  
Peurlies a n'eus ket, evid respont d'am mouez  
Nemed trouz an avel pe kri al loened gouez !  
Ped dervenn zakr, gwechall o voda dindani  
Drouized, stankoh eged ar skourriou 'oa warni,  
N'eus diouto chomet, nag eun Drouiz nag eur skourr !  
Peoh ar maro el leh ma kane teodou flour  
Eskern lezet gand ar bleizi war o dilerh :  
Setu ar pezh am-eus kavet e meur a leh  
A-uz do<sup>9</sup>, a-stribill ouz eur skourr uhelvarr

---

<sup>8</sup> Rehel : reier.

<sup>9</sup> do : dezo.

E-kichenn ar falz aour, an delenn dilavar !...  
O ! Gwenhlan, O ! Drouiz Meur, disterig eo ar rumm  
Euz an Drouized em-eus, dre Vreiz, gellet dastum  
Da zond amañ, hirio : emaint oll en-dro dit !

### GWENHLAN

N'eus forz ! Euz an doueou eo e teu ar gounid,  
Ha n'eo ket euz niver pe euz galloud an dud.  
Ne vo nemed kaerroh ha sklêrroh ar burzud  
Pa vezim deuet a-benn, ni strolladig netra  
Da lakaad, gand on dorn, penn ar bobl da blega,  
Hag en despet dezi da zoubla eur wech c'hoaz,  
War he daoulin : dirag doueou an Dero braz !...

- Klevit eta bremañ perag, Drouized santel,  
Am-eus, 'vid dond amañ, ho kalvet euz a-bell !  
Rag spered eun Doue 'zo o c'hweza warnon,  
Ha d'e heul va spered a nij 'dre an oabl don,  
Leh ma skriv biz Doue, war levriou ar stered  
Al lezennou santel 'zo o c'houarn ar bed !

*(Hag e pign war an daolvêñ.)*

Me a wel eur Groaz-prenn, tri-hant vloaz 'zo peuzvrein.  
Me 'wel eun dervenn vraz, yah ha kreñv 'vel ar mein,  
Goude mil ha mil bloaz he halon en he hreiz ;  
Euz a skeud an dervenn e teh oll Boblou Breiz,  
Touellet gand komzou beleien pennou moal,  
D'en em rei, 'harz ar Groaz, da Zoue eur Vro all !...  
O ! skrijusa torfed euz an oll dorfejou :  
Gand Poblou Breiz-Izel, nahet o doueou !..  
Skrijuz e vo ivez an dle 'rank an douar  
Da baea 'vid terri nerz spontuz o hounnar !

### RU-WARZ

O ! lavar deom eta, rag mall eo ganeom klevoud,  
Peseurt digoll 'zo red d'an doueou da gaoud ;  
Na pa ve red or gwad deom-ni, oll Drouized Breiz,  
Na pa ve zoken ar galon zo 'n or hreiz :  
Or gwad hag or halon ni a rofe<sup>10</sup>, laouen,  
'Vid prena, O doueou ! silvidigez ar ouenn !

### GWENHLAN

Eul liamm sakr a zo, hag eñ heñvel a-walh  
Ouz al liammou kreñv ha burzuduz a zalh  
Ha doueou ha tud skoulmet striz etrezo ;  
Al liamm santel-ze eo an hini a zo

---

<sup>10</sup> Or gwad hag or halon ni a rofe : galleg.

O skoulma etrezo ha tad ha krouadur,  
Ha ne heller ket skei an den en e natur  
Euz eur boan skrijusoh, euz eun donnoh gouli,  
Eged ober dezañ diframma ha terri  
Al liammou beo-ze, liammou greet gand gwad,  
A zo skoulmet etre ar bugel hag e dad.  
Al liamm-ze, sanket e wriziou beo ken don,  
Eo a rank or hontel skei evid kaoud ar pardon !  
Ya, dre vuntr e vugel c'hweh gwech merzeriet,  
Kalon eun tad ez-beo 'dle beza kinniget !  
Eun tad war an daolvên, an eil war egile  
A dle skei ha laza c'hweh euz e vugale !

### TALIEZIN

Va gwad ouz da gleved a zo strafuillet oll,  
Ha skrija 'ra va mell ennon gand an horrol !  
Peleh e vo kavet eun tad ken dinatur ?

### GWENHLAN

*(o tiskenn euz an daolvên)*

Konomor 'n-eus dija lazet pemp krouadur !  
Evid peurechui e labour, ar Hont-meur  
A dle skuilla fenez gwad ar c'hwehved : Tremeur !  
...Goalbran, pa vezo poent, ha prest e vo ar Hont ?

### GOALBRAN

'Ma o hortoz an eur, war ribl al lenn, du hont !  
D'an douar, d'an avel, e skouarn hag e fri,  
Eiz devez 'zo ema dre ar hoad 'vel eur hi !  
A-wechou war ar gwez an uhella e pign,  
Ha pa ne wel netra o tond, e zent a skrign,  
Heja 'ra e armou gand kriadennoù gouez,  
Gand araj e tispenn ar ruskenn euz ar gwez.  
A-wechou, er hontol, e zorn war e vizaj,  
Astennet d'an douar na ne fich na ne flach,  
Evel eur hrouadur a ziroll da grena,  
Da ziframma e vleo euz e benn 'n eur leñva,  
O komz, oh hirvoudi en e bart-e-unan :  
« Gwad adarre, 'mezañ, da wad, mab a garan ! »  
Neuze, pa ne vije soudarded war e dro,  
D'ar gêr en despet din e tehfe prim en-dro !

### GWENHLAN

Kee, ha gra d'ar Hont-meur gedal c'hoaz eur pennad !  
Mez, ha deut eo ivez ar mab goude an tad ?

## RU-WARZ

Ganez, Gwenhlan, eo bet roet din urz da glask,  
Ha da stleja, evel eun oan war bouez e nask,  
Mab yaouank Konomor da ziwada amañ.  
Amzer ha poan 'm-eus bet 'vid kaoud krog ennañ ;  
Rag Jildaz, o houzoud<sup>11</sup> 'oa klasket gand ar Hont,  
E guze dre ar vro, gwech amañ, gwech du-hont,  
Heb rei d'ar hrouadur, na da zen all ebed,  
Da anaoud ar gerent a bere<sup>12</sup> 'oa ganet.  
Goude meur a dro vên, eur pardaez eh erruis,  
Da houlenn va lojeiz e toull dor meneh Rhuyz !  
Eno eo e welis hag eh anavezis  
Ar paotr euz dremm e vamm, euz ment nerzuz e dad.  
Euz a vanahti Rhuyz, Jildas a oa abad.  
Goulenn a ris gantañ beza manah ive' ;  
Kemend a ris zoken ma teuis dizale  
Da veza e vignon, ha mestr-skol gand Tremeur ;  
Evel-se 'm-eus gellet ho kelenn war an eur,  
Pa zivizas Jildas kas euz a ribl ar mor  
Da bourmen dre amañ mab ar hont Konomor.  
Jildas en-deus lezet ahanon penn-da-benn  
Da reñka ar veaj euz va hoant, a va fenn,  
Da zibab an hentchou, da verka e pe boent  
Kemeret al lojeiz hag ar pred hed an hent.  
Êz eo bet din eta, hag el leh hag en deiz,  
Hervez da hoant, teuler an oan e skilf ar bleiz.

## GWENHLAN

Mad eo d'an oan pa lip gliz ar flourennou glaz,  
Mad eo d'ar bleiz pa lonk gwad an oan a lazaz ;  
Ha mad dit ivez, Drouiz, pa hell da gontell noaz  
Lakaad war an douar da redeg, 'vel eur voaz,  
Ar gwad a houlenne an doueou santel  
C'hwez ar gwad-se 'zo din dous evel blaz ar mel !

## TALIEZIN

Evelato, Drouized, 'benn kondaoni eun tad  
Da laza eur bugel ganet diwar e wad,  
Eo red 'pije kavet eur ouenn a dud hudur,  
Eur ouenn a dud sarplant, eo d'an oll plijadur  
O gweled gand o broud ha gand bilim o dent,  
En em zrailla an eil egile war an hent !

---

<sup>11</sup> o houzoud : fazi diouz levezon ar galleg, bet greet abaoe pell 'zo : pa ouie.

<sup>12</sup> a bere : fazi diouz ar galleg, bet greet abaoe pell 'zo : bet ganet digand ar gerent.

### RU-WARZ

Klevet 'teus eo Tremeur euz an uhella gouenn,  
Euz ar hosa e hell biskoaz genel eun den  
Muioh a Rouaned 'zo euz e dadou koz  
Eged a steredenn o lugerni en noz ;  
Gouenn Rouaned int bet dre an oll gantvedou,  
Ha n'eus gouenn-dud ebed ken tost d'an doueou !

### TALIEZIN

Mez ganeoh da vervel, pa'z eo barnet hirio,  
Pa ma par ar vleorim kontell griz ar bourreo :  
Tremeur, en e wazied, n'en-deus dalhet takenn  
Euz ar gwad a verve e kalon tud e ouenn ?

### RU-WARZ

Ar gwel euz a Dremeur hepken a zo a-walh  
'Vid gouzoud pegen kreñv ha divlamm e kendalh,  
Dre e wazied flour, gwad ar Rouaned koz ;  
E benn sonn 'zo warnañ 'vel pa vez o hortoz,  
War e vleo flour, 'giz lin, kelh aour ar gurunenn ;  
Anezañ e-unan, pa gomz, e stou va fenn !  
Ha daoust ma ne ziver 'med mel euz e vuzell,  
Sklêr eo evelato da gompren, er brezel,  
Pegen taer e trouzfe ma tirollfe, eun deiz,  
Nerz an tan a zanter o hori en e greiz.

### TALIEZIN

Ha setu koulskoude an den a vo bremaig  
Skuillet aze e wad ha dispennet e gig !  
Ar gwad a ziskennas euz gwazied Arzur,  
Ar gwad a vag an dorn gouest da zerhel ar stur,  
Da sturia bagig Breiz 'dreuz tarziou ar rehel,  
'Dreuz spont ar hurunou ha kounnar an avel !

### GWENHLAN

Ma ve purroh ar gwad c'hoaz en e izili,  
Kreñvoh 'vid mell dero, glannoh 'vid bleun lili ,  
Ne ve evidon-me nemed gwelloh a ze  
Da ruzia an daolvên zantel a zo aze.  
Rag ar c'hwez anezañ, dre an oabl o sevel,  
Ne vo nemed c'hwekoh a ze evid gervel  
Doueou ar Gelted da zistrei en on touez,  
Da renta d'or bro goz ha d'or gouenn ar vuhez !  
War douar on tadou, perag ne glevom-ni  
Nemed peoh ar maro pe mouez ar velkoni ?  
Luduet ar hêriou, lazet o foblou tud,  
War ar mêziou o ren an anevaled mud,

Ar Vretoned diwad ha dinerz da zerhel  
Lostennou an alar pe kleze ar brezel ?  
Perag 'ta ma n'eo ket abalamour ma 'z eo  
Tebet an doueou a zalhe, yah ha beo,  
E-kreiz ar Vretoned ar gwad koz da vervi ?  
Hag a-walh eo, 'gav dit, gwad oaned pe tirvi,  
Da baea an eurvad da weled, war ar vro,  
'Vid yac'haad o gouliou, on doueou distro ?

#### TALIEZIN

Eur vouez a zo ennon o sevel hag a gri  
Ne hell ket doueou kaoud kalon ken kri' !  
Eun doue 'zo doue evid rei ar vuhez,  
N'eo dreist an den nemed dre vrasoh madelez ;  
Ha pa deu dorn an den er bed da lakaad freuz  
'Vid yac'haad ar gouli, piou a gredfe n'ho-peus,  
Doueou, ken remed nemed eur gouli all ?  
War zigarez eo eet gouenn ar Gelted da fall,  
Piou a gredfe e ve mennoz o doueou  
Dond d'o yac'haad gand gwad, lazerez ha muntrou ?

#### GWENHLAN

Piou en-deus troet dit da spered, ma kredez  
Sevel, a-eneb din, da vouez evel ma rez ?

#### TALIEZIN

Piou en-deus gwasoh c'hoaz troet dit da hini,  
Ma kredez dirag tud, evel pa vent bleizi,  
Displega heb ruzia mennoziou ken euzuz ?

#### GWENHLAN

Ma sellez ouz va bleo gwenn-kann, a-raog respont  
E skornfe war da deod komzou ken divergont !

#### TALIEZIN

Drouiz, gand ar gwad me 'wel<sup>13</sup> hirio ruz da vleio gwenn,  
Gand eur gwad divlamm prest da goueza war da benn !

#### GWENHLAN

Te gav dit eo divlamm, va mab, gwad an hini  
A zeu, dre dreisoni, da hweza kasoni  
E kalon an doueou a-eneb tud e ouenn ?  
Treitour eo 'neb a halv war e vro an estren ;  
Hag eñ n'eo ket mil gwech gwasoh treitour an neb  
A lak kounnar Doue da zevel 'n e eneb ?

---

<sup>13</sup> gand ar gwad me 'wel : galleg.

### TALIEZIN

Mar deo treitour, galvit Tremeur dirag ar varn ;  
Ma tle mervel, lakit anezañ 'tre daouarn  
Ar bourreo, ez eo kement-se e vicher ;  
Mez kondaoni e dad da veza e giger !  
A ! kentoh ma vez sklêr eo Tremeur eun treitour,  
Me houlennfe beza va-unan divennour  
D'am doueou ha d'am bro ! Me 'z afe 'n ho ano  
Eneb Tremeur, da rei pe da gaoud ar maro.  
War da daolvên, pa rank skuilla eur gwad divlamm,  
Forz piou ouzom on-daou en-divije bet lamm,  
C'hwi a rafe dezañ war ar mên didruez  
Peurechui da rei e wad hag e vuhez !

### GWENHLAN

Lez e peoh 'da gleze stag ouz e houriz ler,  
N'eo ket gwad nag emgann ganez a houlenner !  
An doueou amañ ne houlennont ouzit  
Nemed ma kemerer perz ganeom oll el lid !  
Evid mired ouz breh Konomor da grena,  
Pa grogo er gontell, ni 'grogo da gana  
Ha da gana ken taer, ma c'hwezim, gand or han,  
E kalon Konomor ar gounnar hag an tan !  
Peb Drouiz eo red dezañ skei Tremeur da vervel  
Gand nerz e youl, ha nann gand beg lemm e gontell<sup>14</sup> !  
Kaer o-defe mil gwad redeg ruz, a-boullou,  
Gantañ ma ne ve ket kemmesket or youlou,  
E chomfe dihalloud ar gwad da zinerza.  
Vañjañs an doueou, warnom prest da goueza !  
Ha ma chomfe eun Drouiz hepken heb unani,  
Evid ar muntr sakr-mañ, e youl gand on hini,  
A-walh 've kement-se evid kas da neant  
Al lid-mañ en-deus din koustet kemend a boan.

### TALIEZIN

Mad, neuze eo koulz dit, a-raog ober an taol,  
Chom heb prepar, amañ ar gontell hag an daol ;  
Rag eun drouiz zo amañ ha na garfe biskoaz<sup>15</sup>  
'Vid eur seurt muntrez, O Drouized, rei deoh skoaz !  
O ! Kredi a rafen emaoñ oh ober goap !  
Petra ! N'eo ket a-walh e teufe gwad eur mab  
Da zistanka bremaig dindan kontell e dad,  
Da vera d'an douar dirag on daoulagad ?

---

<sup>14</sup> nann gand beg lemm e gontell : galleg : ha n'eo ket...

<sup>15</sup> ne garfe biskoaz : biken.



Nebeud eo chom heb saill war eur seurt aneval !  
Pa zispenno e vab, red e vo c'hoaz, gand mall  
Teuler er gwad da neuï or halonou laouen !  
N'eo ket a-walh eur muntr da zoueou or gouenn ?  
Peb drouiz en e galon a dle renevezi  
An torfed a dlefe ober dezo heugi !  
O ! doueou digriz<sup>16</sup>, ne fell deoh war ho tro  
Kaoud 'med beleien a vuntr hag a varo !

### GWENHLAN

Evid da zoueou, marvet eta ar feiz  
'M-oa gand ker braz soursi maget dit en da greiz ?  
Te, am oa dibabet etre da oll vreudeur  
'Vid dougen d'am goude kurunenn an Drouiz meur  
Te eo a deu hirio da hlaouri warni,  
Ha d'he bresa dindan da dreid e-kreiz ar pri ?  
O, siwaz ! Piou eta en-deus laeret warnon,  
Va mab Taliezin, teñzor aour da galon ?  
Laeret eo da galon gand ar manah penn moal  
Pa 'n em-eus ket outañ gouezet mad e ziwall !

### TALIEZIN

Den ne hellfe laerez kalon Taliezin :  
Da rei da neb a gar va halon a zo din.  
Dit e oa va halon, dit ha d'an doueou :  
Te eo 'teus etrezom trohet al liammou  
Gand da gomzou, krisoh 'vid dremm ar gontell dir !  
Ma'z tije kendalhet gand ar vad hag ar gwir  
Da vaga va halon, beteg eur da varo  
'Vijen chomet ganez dindan skeud da zero !  
Mez pell 'zo e santen o tond, euz da vuzell  
War va spered, felh treñk kemmesket gand ar mel !  
'Vel koumoulennou noz o tond da heul ar sked !  
Hirio, n'ez out mui nemed eun heol mouget,  
Ne zistaolez mui din nemed noz ha moged !  
Pell ouzit e fell din, gand euz, kemer an teh  
Da glask an deiz nevez, du-hont, n'ouzon peleh !  
Evel ar haro skuiz a red d'an eienenn,  
War-eün, heb netra 'med e zehed d'e ren,  
Me a yelo a-dreuz an noz ken a gavin,  
Dirag va daoulagad, ar sklêrijenn vintin !  
*Diblas a ra da vond kuit.*

---

<sup>16</sup> digriz : kig digriz : kig ha n'eo ket bet poazet penn-da-benn, chomet gwad ennañ.  
"gwadeg".

## **GWENHLAN**

*(o stanka an hent gand e gleze)*

Hag a gav dit tehel ouzom-ni evel-henn ?  
Me a fell din, a-raog ma tehi ahalenn,  
E ve war an daolvên peurechuet al lid,  
Ne hellom rei dezañ e oll halloud heb dit !

## **TALIEZIN**

*(a denn e gleze ivez)*

Al lid-se eur wech c'hoaz, a chomo dihalloud  
Mar deo red deoh, evid e lakaad da dalvoud,  
Kaoud va bolantez unanet gand ho re !  
Nnan ! Biken ne droin va youl da gement-se,  
Ha renoñs d'e laza koulz ha ve deoh eta,  
Peogwir ne dalvo deoh e varo da netra !

## **GWENHLAN**

Va faotr n'ouzez ket petra eo an Drouiz koz !  
Kredi 'rez n'eus ouzin nemed moged ha noz ?  
Me a ziskouezo dit ez eus luhed ha tan  
Ennon, a-walh evid d'az pulluha dindan !  
Drouized, krogom ennañ d'e laza war an eur<sup>17</sup> !  
Evel-se ne chomo en on touez, O ! breudeur,  
Treitour ebed da zinerza al lid santel !  
Warnout 'vo da genta êsaet ar gontell !

## **EUN DROUIZ**

*(gand e gleze a zivenn Taliezin)*

Ola ! Ne gredit ket n'eus amañ 'med eun drouiz  
Hag en-defe heuget 'rag eun torfed ken kriz.  
Me 'dro a-du gantañ : biken ne houzañvin  
E ve dirazon-me skoet Taliezin !

## **EUN DROUIZ ALL**

*(ar memez tra)*

Ya, gand Taliezin ema ar wirionez !  
Ouz da gleved, Gwenhlan, me 'm-eus bet spont ha mez ;  
Etre on diou galon me 'm-eus santet ive'  
O terri al liamm gwechall skoulmet ken kre(ñv) !

## **EUN TREDE**

*(evel an daou all)*

Gand on dorn nag or youl, biken, skoaz ne raim ni  
Da ziwadaTremeur amañ, evel eur hi !  
Ha pa'z eo ken digriz doueou an taoliou-mein,

---

<sup>17</sup> war an eur : galleg. dioustu.

Dezo, gand Taliezin, ni hirio a dro kein<sup>18</sup> !

### **GWENHLAN**

Petra a glevan-me ? Perag oan-me bevet  
Keid all evid klevoud ar pezh am-eus klevet ?  
Kleved moueziou drouized o sevel 'eneb din,  
'Eneb din o sevel da vouez, Taliezin !  
An Drouized dirazon rannet e diou rummad,  
Gand tangwall ar vañjañs e verv o daoulagad,  
Ema o hlezeier ganto 'tre o daouarn !  
En-dro din luhadenn an dir, trouz an houarn...

Eneou an Drouized koz, diwallerien ar vro,  
Diredit amañ oll euz a beoh ar maro,  
Da zistana o gwad hag o halon direiz !

### **TALIEZIN**

Paouez, te, da bedi eneou Drouized koz Breiz,  
Ha, ma komzfent hirio, e rofent o malloz  
D'an neb en-deus mesket, gand o henteliou koz,  
Sorhennou ken mezuz hag ar re 'teus, bremaig,  
Gand da henou trompluz, kredet deom-ni kinnig !

Drouized koz, ha n'eo ket hoh ene a zantan,  
En eur-mañ, em halon o c'hweza tiz ha tan ?  
Ya, ho mouez a glevan, o tisklêria din sklêr  
Ne zeu, euz muzellou Gwenhlan, nemed gevier.

Tehel a reom bremañ ; mez pa va deut an eur,  
Ni 'vezo oll amañ evid divenn Tremeur,  
Evid divenn ivez kredenn ar wirionez,  
Evel eur mel treñket troet e gaou ganez.

### **TALIEZIN**

*(o kana, taer ha kreñv, war don Arzur, troet war-zu Gwenhlan).*

### **TON AN DISKAN**

*Etre da zaouarn ne gan ken,  
Raouliet warni ar zeiz kordenn,  
O ! Drouiz Gwenhlan, an aour-delenn.*

### **TON AR HOUBLAD**

*(o trei e gein da Wenhlan 'n eur gana dousoh)  
Mez, war an avel e teu din,  
Kan eun delenn, ouz he herdin*

---

<sup>18</sup> Dezo, gand Taliezin, ni hirio a dro kein : galleg.

*Mouez sklêr an alhweder mintin.*

### **DISKAN**

*(war-zu Gwenhlan)*

*Sehet he skourr hag he ruskenn,  
Ar preñv, o krignad he gwrizienn,  
Da zervoenn goz 'vrall uz 'da benn.*

### **TON AR HOUBLAD**

*(o trei e gein)*

*Gwez nevez dre Vreiz en em skign,  
Hañv-goañv glaz evel gwez ivin,  
O vera outo mel ha gwin.*

### **DISKAN**

*(war-zu Gwenhlan)*

*A-raog mervoel 'dreg an dorgenn,  
Da heol a horjell hag a gren  
Dre hentchou an neñv o tremen.*

### **AR HOUBLAD**

*(o trei e gein)*

*Eun heol nevez en oabl a bign,  
O tistaol gor ha nerz divin.  
O ! gwazed Breiz, leiz ho peultrin.  
(Ha kuit gand e vignoned).*

### **GWENHLAN**

*(mantret)*

*An taol-mañ 'oa pell 'zo va spered o hedall ;  
Kaer 'm-eus bet ober va bouzar ha va dall,  
Ho kredi a rankan, kannaded a varo,  
E kavan deiz ha noz, ha bep tu war va zro.  
Ar gwad a houlenneh, doueou euz va spered,  
Ne vezo ket skuillet en doare ma'z eo red !  
Ne vo ket greet al lid a dlee ho tiwall  
Euz dremm falh an Ankou, O ! traou amzer wechall !  
O ! traou an amzer goz, O ! meinhir, O ! dero, !  
Drouized ha doueou, warnom 'par ar maro !*

*Hag e kan, war don : Marzin, bremañ trizeg miz.*

*Me a glev, o tond euz a bell,  
Eur hoabrenn zu 'giz eur sparfell,  
Kurun ha tan e diou askell.*

### **DISKAN**

*Sell, telenn aour, sell tal-oh-tal ouzin,  
Biz 'an Ankou 'sko war da gerdin.*

*Eul luhadenn forheg dindan  
A-stribill evel eur skilf tan,  
En he skeud eul labous a gan !*

*Dindan skilf tan ar sparfell du  
Taolet eo d'an avel e blun<sup>19</sup>,  
Hag e gorvig-paour e ludu !  
(O lavared an diskan, e torr e delenn gand trouz).*

### **GOALBRAN**

*(o kemer an delenn euz dorn Gwenhlan).*  
O ! etre da zaouarn, torret an aour-delenn ;  
Diouti en eun taol freuzet ar Seiz kordenn ;  
Ar herdin aour, steuet gand dorn an doueou,  
O chom e pep hini anezo sperejou

### **RUZ-WARZ**

*(oh ober kemend-all).*  
Seiz spered a veve e kerdin an delenn,  
Seiz Doue o tiwall buhez ha gloar ar ouenn !  
Ha setu-int freget ha diskoulmet o-zeiz !  
Peleh oh-c'hwi tehet, O ! diwallerien Breiz,  
Peleh oh-c'hwi tehet, sperejou melodiuz,  
Pa'z eo torret ganeom al liammou nerzuz  
A oa ouz ho skoulma ouz korvig an delenn,  
'Vel ma'z eo ouz e gorv skoulmet ene an den ?...

### **FRIAL**

*(oh ober kemend-all).*  
Tavet an delenn aour, a lakaas an doueou  
Enni ar wirionez, mezur an eneo ;  
Mouget an delenn aour, a oa he seiz kordenn,  
War spered ar Gelted, o strinka sklêrijenn !  
Gwelloh e vije bet e vije eet an heol  
E goueledou teñval an neñvou d'en em goll.

### **GOALBRAN**

Hi eo a oa buhez ha nerz pobl Breiz-Izel.  
P'eo marvet an delenn, red 'vo d'ar bobl mervel !  
Hag e vezo bemdez disterroh-disterra  
Gouenn nerzuz ar Gelted o tiskenn da netra !  
Sked ebed euz ar vad o para war o zal,

---

<sup>19</sup> e blun : e bluñv.

Sked ebed euz ar gwir en o sperejou dall,  
Hent ebed, d'o ene, digor dre an neñvou,  
'Vid mond a-denn-askell da vro an eneou !  
Gwad ar ouenn a vagas speredou ken uhel,  
Ne hano nemed tud, siwaz, muioh heñvel  
Ouz an anevaled, 'ma o oll blijadur  
O turial, dizeblant, e-kreiz ar fank hudur ?

### GWENHLAN

Hag an oll drougou-ze a skofe war ar ouenn  
Dre faot gwad eur paotrig da hlebia va zaolvên ?  
Kement-se ne vo ket ! Gwad Tremeur a skuillo !  
Gand va dorn va-unan, e ruillo,  
Gand gwad ar paotr Tremeur, gwad c'hoaz kement hini  
Ouz bolontez an Drouiz a glasko enebi !  
Konomor 'zo aze, dre ar hoad gand e dud,  
Heñvel ouz bleiz diboell a skrign, a red, a yud !  
M'hen tou dit, Konomor, O ! bleiz koz, n'az-po ket aon !  
Gwad az-po d'az sehed, ha kig az-po d'az naon !  
Ha ma teu, daoust da ze, galloud va doueou  
Da veza er vro-mañ kollet d'an eneou,  
Da vihanna, taolvên, ha mênhir, eur wech c'hoaz  
E tiredo warnoh puill, druz ha ruz, eur waz,  
Eur waz a wad kristen, a-walh evid derhel  
Ar zoñj euz an Drouized 'dreuz ar hantvedou pell.

*Fin ar henta Arvest*

## EIL ARVEST

Er pennad kenta euz an eil arvest, mignoned Taliezin a zo prest da fallgaloni ; mez an Drouiz yaouank a ro dezo adarre nerz-kalon da zivenn Tremeur.

En eil pennad e welom Konomor o tond gand Gwenhlan ; spontet gand ar remors<sup>20</sup>, ar Hont a refuz bremañ laza e vab Tremeur ; plega a ra evelato da hourdrouzou Gwenhlan, hag a dou skei n'eo ket hebken Tremeur, mez Taliezin ivez, hag e vignoned.

Setu ivez o tegouezoud, goude ma eo eet ar re-mañ kuit, Tremeur ! Teñval eo e benn, rag klevet a ra eur vouez en e spered o lavared dezañ e tle mervel evid prena, gand e wad, eneou ar Vretoned da Jezuz-Krist ; kaer o-deus Armel ha Taliezin, ne hellont ket kas euz e spered ar c'hoant mervel !

N'eus nemed sant Jildas, gand e gomzou hag e oberou burzuduz, hag a hellfe e zavetei.

Taliezin a en em daol dre ar hoajou evid klask Jildas da zavetei Tremeur.

### KENTA PENNAD

#### TALIEZIN

hag

#### AN TRI PE BEVAR DROUIZ YAOUANK

#### AR HENTA DROUIZ

Petra on-deus-ni greet, Bugale diskiant ?  
Savet on-deus or mouez 'eneb an Drouiz, ar zant ;  
Gand or spered disler, on-deus kredet sevel  
A-eneb an hini eo roet dezañ ar gwel  
Euz kement tra a zo kuzet e-kreiz an noz,  
Koulz euz an traou da zond hag euz traou gwechall-goz ;  
Gand or penn skañv, sammet gand foug ar yaouankiz,  
War gomz ar beleg braz on-deus taolet dispriz !  
Pe gentoh, d'ho komzou, O ! doueou santel,  
On-deus kredet c'hoarzin, paotred yaouank diboell !  
Setu bremañ warnom ho malloz o koueza,  
Ha war or bro ouspenn ho kounnar o poueza.

#### AN EIL DROUIZ YAOUANK

Evitañ da veza eun dra griz d'ar spered  
Perag maro Tremeur ne ve ket eun dra red ?  
Perag ne ve ket red, evid gwalhi or fank  
E skuillfe d'an douar gwad flamm ar priñs yaouank ?  
Perag evid mired ouz or gouenn da vervel  
Ne deufe ket ho mouez, O ! doueou d'or gervel  
Da leda or horvou war daolvên ar maro,  
Da skuilla on oll gwad evid buhez ar vro ?

---

<sup>20</sup> remors : morhed

### AN TREDE

Ne ve ket gwelloh deom, paour-kêz Taliezin  
Dirag an tad Gwenlan 'n em daoler d'an daoulin,  
Anzao on-deus komzet evel tud dientent,  
Ha d'an oll drouized all rei dorn da ziagent  
Evid peurechui al lid en-do galloud  
Da bellaad euz or penn ar spontusa darvoud ?

### AR HENTA

Ya, skoulmom adarre ar seiz kordenn brevet  
War an delenn aour sakr, 'vid ma vo c'hoaz klevet  
A-hed traoniennou Breiz, o c'hweza, gand he han  
E kalon ar Gelted, nerz didreh an emgann !  
Ya ! ra varvo Tremeur, peogwir eo red e skei  
'Vid lakaad a-biou deom kurun Doue da drei.

### TALIEZIN

Skei Tremeur da vervel ? O !... rei dorn d'e laza !...  
Dirag e varo kriz en em rei da gana !...  
Gweled e dad digriz, gand ar memez kontell  
M'en-deus dija ganti diwadet pemp bugel,  
E poull-kalon e vab sanko taol ar maro ?...  
Nann !... Da gement-se biken va halon ne blego !  
Nann ! Nann ! Ema ennon adarre o sevel  
Ar vouez nerzuz am galv keid all 'zo da dehel,  
Da dehel pell euz skeud dero teñval an Drouiz,  
Pell euz an daolvên gwad, euz he lidou, digriz !  
Me a deho du-hont war gern ar menezioù,  
'Vid santoud digeri ennon, gand ar bleunioù,  
Da sked an deiz santel, va halon dizehet !  
Va halon, 'vel ar bleun, he-deus naon a zehed,  
Naon d'ar bannou heol a zeu, da houlou deiz,  
'Vel eur mel euz an neñv, da goueza en o hreiz !

Da sked war va ene, O gwirionez santel !  
Da vouez eo a glevan em hreiz ouz va gervel !  
Mez komz din sklêrroh c'hoaz ! Sav uhelloh da vouez,  
Pe mouget 'vo gand nerz ar hriadennou gouez  
A zavo, meur a wech c'hoaz, en diabarz din...  
Spered a gelennas spered Taliezin,  
Pa gredis 'n em zével a-eneb an Drouiz-meur,  
Daoust ha ne hellan c'hoaz da anaoud, O va breur ?  
En-dro din e klevan evel trouz da askell  
O voudal d'am skouarn 'vel eun êzenn avel !  
Komz 'ta c'hoaz d'am spered, O ! kannad euz an neñv,  
Ha taol da sklêrijenn da bara d'am ene...



Euz a houeled ar hoad, piou 'zo erru du-hont ?  
Sell ! an drouiz-meur Gwenhlan, harpet war skoaz ar Hont !  
Amañ, kredabl, o-daou int erru 'vel daou gi ,  
War roud ar had, 'gav dezo, d'en em lakaad e spi !  
O ! koublad chas diboell, ar hadig-se, m'hen tou,  
N'eo ket prest da goueza c'hoaz dindan o skilfou !  
Me jom amañ da guz evid gweled penaoz,  
'Vid stigma o rouedou, e raio an daou goz !  
C'hwi, tehit ahalenn ! Mez diwallit, m'ho ped,  
Pa zantit goulou deiz o tond war ho spered,  
Diwallit da vouga ar sklêrijenn zantel,  
'N eur rei dorn da laza eur paour-kêz bugel !

*An tri drouiz a 'z a kuit : Taliezin en em guz.*

# EIL PENNAD

## GWENHLAN, KONOMOR

### GWENHLAN

Ya, eur pemp pe hweh drouiz, gand n'ouzon pe froudenn,  
O klevet Taliezin eo bet troet o fenn,  
Ha ne fell ket dezo en ol lid kemer perz.  
Hogen, ol lid santel ne hell kaoud e nerz  
Nemed unanet 've youlou an Drouized oll  
Gand da zorn, o vounta ganez pa ri an taol !  
Mez, e fas an neñvou e fell din hen toui :  
D'am ger, penn an Drouized vo red dezo stoui ;  
Neb ne falvezo ket rei an dorn d'am zikour  
A rank beza skoet 'vel ma skoer ar skourr,  
Gand aon e ve breinet ar wezenn en he fez.  
Ya, peb drouiz, dindan boan da goll e damm buhez,  
A unano bremaig e youl gand on hini.  
Hag a-raog skei Tremeur, laz din kement hini  
En-defe c'hoant ober amañ e veg figuz.  
Pell 'zo ne vezo bet an daolvên zakr ken ruz !

### KONOMOR

Laza, laza bepred !... Va buhez penn-da-benn  
Abaoe 'm-eus kavet ahanout war va hent,  
N'eo bet, koulz lavared, nemed eur vuntrez !  
Evel ma vez galvet en eun ti ar higer  
Evid prepar kig fresk eur wech beb an amzer,  
Galvet ganit-te, Drouiz, ped gwech n'on-me ket deut  
D'an dervenn-mañ, a guz an daolvên en he skeud !  
Ha bewech war gwrizienn an dervenn e redas  
Eur poull gwad da ruzia an dour sklêr 'barz ar waz !  
Na pebez spont warnon, pa zeuan da zoñjal  
En oll dud-se, 'zo bet lazet ganen gwechall !  
Dirazon e savont e-kreiz va huñvreou  
Ar gwad o tivera c'hoaz euz o gouliou,  
Spont mantruz ar maro ganto en o zellou,  
Hag en o gouzougou kriadenn an Ankou !...  
C'hweh pried 'm-eus lazet gand o hrouadurien,  
Aze, war an daolvên, an eil goude eben !  
Lazet 'vid da zoueou, war da urz, O Drouiz-Meur !  
Ar hwehved anezo, Trifina, mamm Tremeur,  
Dousoc'h eged eun Êl, kaerroh eged an deiz,  
Merh d'ar hont-meur Gwevrog, euz gouenn Rouaned Breiz,  
Euz or skilfou 'oa bet diframmet gand Jildas.

Bremañ, pa eo kouezet, he mabig en da las,  
N'eo ket a-walh dit c'hoaz e teufe va hleze,  
Gand ar hrouadur paour da lemel e vuhe' !  
A-raog skei va mabig, eur pemp pe hwec'h drouiz all  
A dle koueza o fenn dindan dremm va bouhal !  
Ganin, evid eur wech, re a houlennez, Drouiz :  
Kemend am-eus lazet dija, ma'z on eet skuiz !

### **GWENHLAN**

Skuiz, skuiz o laza ?... Gra evel a gari !  
Mez dalh soñj : on doueou 'zo prest da gounnari !  
N'eo ket hirio, setu meur a vloavez dija  
E vije, O Kont meur, dleet dit e laza.  
A ! skuiz out o laza ! An doueou, va mab,  
'Zo skuiz ouz da weled diouto ober goap,  
Ha war da benn me 'wel eun dorn spontuz savet !  
Skei, pe beza skoet ! Laza, pe beza lazet :  
Setu da blanedenn !... 'Vid ar wech diweza  
Eo e houlennez ganez an doueou laza !  
Pa vezo kinniget dezo Tremeur, kerkent  
Dirazout da beb gloar 'vo digor frank an hent !  
Me a glev, e goueliou da vagig, an avel  
Prest da hweza evid da zougen, du-hont, pell,  
Da borz an eurusted, er broiou burzuduz,  
'Leh ma sav war an aod ar paleziou skeduz,  
'Leh ma ruilli e-touez an arhant hag an aour !...  
Mar deo gwelloc'h ganez beva izel ha paour,  
Euz a-berz on doueou gouzañv spont hag anken,  
O hudurun bepred o kroual war da benn ;  
Mar deo gwelloc'h ganez eun deiz, dindan o zroad  
Evel eur preñv, renta da vuhez ha da wad :  
Neuze, va faotr, kendalh da ren da vuhez reiz,  
Evel eul labousig kaner war bord e reiz !

### **KONOMOR**

*(spontet)*

O ! setu adarre warnon kouezet ar spont !  
Spesou ar re lazet en em ziskouez du-hont,  
O teredeg warnon oll gand herr ha gand droug !  
Trifina ! Trifina, ganti war he gouzoug,  
War he gouzoug gwennoh 'vid gouzoug eur goulmig,  
Tri gouli ruz, tro-dro dezo ken flour ar hig !

### **GWENHLAN**

Kredi 'ri ahanon ? Ar re-ze 'zo kaset  
Evid goulenn Tremeur ! Pa vo dezo taolet,  
Ne deuio mui biken spes ebed war da dro,

Klozet ma vint er bez gand siell ar maro !  
Mez ma ne fell ket dit senti d'o goulennou,  
An doueou a zalho digor frank ar beziou,  
Euz ar bez e weli anaon o tilamm  
Da ziframma ganez da vuhez tamm-ha-tamm,  
Ha da grigna ennout, didruez, direpoz,  
Evel preñved diboell, da galon deiz ha noz !

### **KONOMOR,**

*(o koueza d'an daoulin)*

O ! Drouiz, truez ouzin! Plega a rankan dit !  
Hervez da hoant, fenez e vezo greet al lid !...  
Ema va zoudarded skignet oll dre ar hoad,  
Pep hent ha peb ode ganto diwallet mad !  
Dre zindan an douar 've red kemer an teh,  
Ker brao am-eus stignet rouejou dre beb leh !  
Ha ne anavezan nemed eun den, Jildaz,  
Hag a hellfe tenna ar gedon euz ol las !...  
Ne garfen ket hirio, etrezom ha Tremeur,  
Kaoud, 'vel ar wech all, dremm hlaz ar Manah-meur.

### **GWENHLAN**

Lest ganen-me Jildaz ! Ha deom dre ar hoajou  
Da stigma c'hoaz strisoh-strisa ar rouejou.

## TREDE PENNAD

### TALIEZIN

*(o tiskoach)*

Spufa a ra va bleo pa choman da zoñjal  
En traou spontuz amañ bet c'hoarvezet gwechall !  
Bremañ 'ouezan perag, o tostaad ahalen,  
E vije va halon gwasket gand an anken !  
Ken aliez amañ 'tremenias an ankou !  
M'en-deus, war gement tra, merket don e roudou.  
Ken aliez amañ 'tremenias ar maro,  
M'en-deus, e kement tra, lezet e vlaz c'hwero !  
Lezet az-peus amañ, eneou en angoni,  
Euz poan an tremenvan an tañva ganeom-ni ;  
Ha gand an tañva-ze eo e santan ennon,  
Dindan an dervenn goz, o skrija va halon !...  
O ! pebez liou spontuz, dervenn goz, d'az teliou  
Ar gwad war he glazvez en-deus lakaet e liou ;  
Rag gand gwad ez eo bet maget dit da wrizienn ;  
Gand avel ar maro eo e kren peb delienn...

*(o selaou)*

Huanad ar maro, e leh kan an avel,  
Euz da skourrou teñval eo a glever sevel.  
O ! gwezenn ar maro hag an deñvalijenn,  
Pell ouzit e klaskin buhez ha sklêrijenn !  
Sklêrijenn, war va zal peur e savo an deiz ?  
Gwirionez, peur 'teuio da sklêrijenn em hreiz ?  
O ! pebez c'hoant poaniuz, pebez naon diremed,  
Pebez sehed iskiz a dourmant va spered !  
Evach santel, euz a beleh dre an neñvou  
E strinki-te da zistana va skiantchou !..  
Mez piou, gand ar hoad don, 'zo erru adarre ?  
Daou baotrig harp an eil war skoazig egile,  
Hag o diou vreh skoulmet ganto dreist o herhenn  
Ker brao dindan ar hoad teñval gand o zae wenn ?  
Evel gand ar varzed, telenn 'zo gand unan  
Hag ez eus etrezo kaoz ha c'hoarz, ha mouskan.

*(Hag en em guz adarre.)*

## PEVARE PENNAD

TALIEZIN, *kuzet*, TREMEUR, ARMEL

### TREMEUR

*(o kana, war eun ton nevez).*

*Evel skourrou braz eur wezenn,  
War douar Breiz en em astenn  
Divreh ledan ar Groaz kristen.*

*E-kreiz ar skourrou burzuduz  
Pemp gouli ar Roue Jezuz  
A bar evel pemp heol skeduz,*

*E peb leh ma sko an heol-ze,  
E sav eienennou buhe'  
Koulz er mêziou hag en ene !*

*War ribl ar mor, ouz da hortoz  
Me glev sevel, e-kreiz an noz,  
O heol santel ! galv va Bro goz.*

### TREMEUR

Ne deo ket kuzet c'hoaz an heol 'dreg ar mene'  
Bewech, pa e velan o sevel dre an neñv '  
Ne hellan, O ! Armel, mired euz va spered  
Da zoñjal e Jezuz, an heol a dle e sked  
War zouar on tadou en em skigna dre-oll.  
Joa eo ganen pignad da vare ar zao-heol,  
Evel an Drouized koz, war eur menez uhel  
Evid gweled an deiz 'sevel war Breiz-Izel !  
Mez e-leh kaoud joa oh e weled, neuze  
N'ouzon peseurt anken a sko war va ene i  
Ha dre ma kan pep tra en douar, en neñvou,  
Em halon-me ne zav nemed mouez ar hañvou.  
Warnon hirio ar boan a sko kreñvoh-kreñva,  
Ken ne hellan mired, O ! Armel, da leñva.

### ARMEL

Leñva, pa 'ma pep tra o kan' hag o c'hoarzin !  
Truez az-teus, kredabl, euz bleuniou ar mintin ;  
Oh o gweled o skuill evel daelou o gliz,  
Sevel a ra ennout, Tremeur, truez iskiz !

### TREMEUR

Breurig, arabad eo va goapaad evel-henn !  
Nann, a-dra-zur, n'eo ket daelou gliz eur vleunienn,

Eo a lak' an anken da waska va spered !  
Daelou gliz, gand an heol a vez sehet abred ;  
Mez va daelou a zalh da vera hed an deiz,  
Ha va foan, dibaouez, a zalh digriz em hreiz !  
Lavared a rin dit petra 'zo kirieg din  
Da leñva, daoust da joa ha da heol ar mintin.

Gwelet 'teus a-wechou, pa vez an deiz erru,  
War hent an heol o tond, a-vernou, koumoul du  
Heñvel ouz menezou berniet war menezou ?  
Kaer en-deus pignatd, ha distaol e varrou,  
An heol ne hell, na dreist, nag a-dreuz ar goabrenn,  
Lakaad war ar mêziou da bara sklêrijenn !  
Mad, ar zoñj 'zo lakaet don em halon, aze,  
Dirag heol va Jezuz me eo ar goabrenn-ze !  
Ha biken war or bro e heol sakr ne baro,  
Nemed pa vin-me het skubet gand ar maro !

### **ARMEL**

Ar seurt sorhennou eo a ra dit ker braz neh ?

### **TREMEUR**

Petra ! hag-eñ e hell beza pounerroh beh,  
War spered eur hristen, eged ar zoñj ez eo  
Kirieg d'an heol santel, da heol an Doue beo,  
Ma ne deu da bara war ene e vreudeur ?  
'Vidon-me ar zoñj-se zo, ennon da beb eur,  
O skei war va halon 'vel eur broud bilimuz...  
Beza eur goabrenn zu dirag heol va Jezuz...  
Beza war hent an deiz pa strink, euz lein an neñv,  
Ken kaer ha ken nerzuz evid klask eun ene,  
Evid klask an ene da lakaad da zével  
Enni bleun an neñvou gand blaz ha c'hwez ar mel !...  
Ma'z on ar goabrenn-ze, A ! kentoh, ra vezin  
Dispennet dre an neñv gand an êzenn vintin !  
Ra vezin gand an heol teuzet, war ar mêziou  
Da veza gliz klouar war galon ar bleuniou !  
Ra vezo va gwad oll skuillet war douar Breiz,  
'Vid ma skedo flammoh warni heol sakr ar Feiz !

### **ARMEL**

*(o kemer e zorn)*

Perag, O ! va breurig, kemered ker braz neh,  
War zigarez eur zoñj deut dit..., euz a beleh ?

### **TREMEUR**

A beleh, ma n'eo ket euz Doue e-unan ?  
Bepred eo bet ennon ar zoñj-se ez-vihan !

Ar zoñj n'ez on ganet nemed evid mervel,  
Mervel yaouank, tostig va bez euz va havell.

**ARMEL**

Soñj edon da zerhel kuzet dit a-viskoaz  
Eur zekred 'm-eus desket, n'eus ket pell amzer c'hoaz !  
Mez, hirio pa welan eo re deñval da benn,  
Red eo din, 'vid pellaad diouzit an anken,  
Disklêria dit ar pezh am-oa klevet neuze.

**TREMEUR**

'Teus klevet eur zekred a-ziwar va fenn-me ?

**ARMEL**

Ya, Tremeur ! Diouzit n'emaon oh ober goap !...  
Ha gouzoud a rez-te euz a biou out-te mab ?

**TREMEUR**

Tremeur 'zo er bed-mañ eur paour-kêz emzivad !  
N'anavezer dezañ na kar, na mamm, na tad !  
Stlapet on bet, ne oar den 'bed euz a beleh,  
Da vervel, eun nozvez, dirag dor ar veneh.

**ARMEL**

Tremeur, klev ahanon, ha paouez da ouela !  
Tremeur, te 'zo ganet euz ar gwad uhella,  
Euz ar gaerra gouenn dud 'zo bet biskoaz er bed !  
Breur, en da wazied, gwad Arzur eo a red !

**TREMEUR**

Klask a rez tro, Armel, da zeha va daelou,  
Ha c'hoarzin a rafen va gwalh ouz da zelaou,  
Pa ne vez re bonner va foaniou dibaouez  
'Vid da zelaou hizio 'tibuna farserez !

**ARMEL**

Dirag an Neñv, Tremeur, dirag Doue, m'hen tou !  
N'eus farserez ebed ganin en va homzou !  
Eun deiz, e-kreiz ar hoard, a beden en distro  
Pa welis tostig din, 'dreg eur vodenn zero,  
Daou zen o tond : unan oa Jildaz, on abad.  
An hini all, perlez hag aour ouz e zillad,  
A oa eur hleze hir 'sribill ouz e gostez ;  
Gwevrog, kont-meur Gwened, a oa ano hennez,  
Dioh ma hellis gouzoud o selaou piz o haoz ;  
« Petra 'teu da veza mab or Rouaned koz ? »  
A houlenne Gwevrog ; « tostaad a ra an eur



Ma savo war e dron va mab-bihan Tremeur ;  
Neuze 'vezo gwelet ha savet 'teus da Vreiz  
Eur gwaz kreñv, gwir galon eur roue en e greiz ;  
Gwelet e vo hag-eñ az-teus dalhet dinamm  
Gwad Arzur, a deuas d'ar paotrig gand e vamm ?... »  
O klevoud kemend-all, ken mantruz 'n em gavis,  
Ma ne glevis netra mui ken euz o diviz.  
Mez a-walh 'm-eus klevet, pa 'm-eus gellet deski  
Eun dra da zistana da houli o leski.

### TREMEUR

Me euz a wad Arzur ? O ! ha posubl e ve ?...  
Anaoud a ran bremañ peseurt tan a verve,  
Hag a zeve ennon va halon ha va gwad...  
Nann, 'n em-eus poan ebed bremañ, pa zoñjan mad,  
O kredi e tiskenn, Arzur, euz da hini  
Ar gwad birvidig-mañ a red em izili !  
Porz peur 'teu da ano beteg va diousskouarn,  
E seblant din klevoud trouz dir ha trouz houarn,  
Trouz houarn ha trouz dir ouz va gervel da vond  
War an dachenn vrezel 'kreiz ar gwad hag ar spont !  
An daouarn-mañ n'eo bet desket dezo biskoaz,  
E iliz ar veneh, 'med ober sin ar groaz,  
An daouarn-mañ a grog terzienn vrezel enno,  
Arzur, bewech pa zeu d'am skouarn da ano.

### ARMEL

Ya, ar gwel ahanout en eur-mañ 'zo a-walh  
Evid diskouez pegen birvidig e kendalh  
Gwad or Rouaned koz e-barz da wazied ;  
'N eur zeski dit kroazia devod da vizied,  
Jildaz 'n-eus dinerzet tamm ebed da zivreh ;  
Ha m'en-deus desket dit pedi 'touez ar veneh,  
Maget en-deus ennout an nerz a vo eun deiz,  
O ! mab-bihan Arzur, silvidigez or Breiz.

### TREMEUR

Nemed kreñvoh a ze eo ennon gwad Arzur,  
Pa 'm-eus bet gand Jildaz gwad Jezuz d'am mêzur.  
Gwad Arzur a rofe din nerz da gaoud an treh  
War gement a zavfe, a-eneb Breiz, e vreh :  
Gwad Jezuz a rofe an nerz kalz kreñvoh c'hoaz  
Da vervel evid Breiz, ma vez red, 'benn warhoaz !...  
Rag kendelher a ra bepred war va halon  
Ar zoñj eo astennet dorn ar maro warnon ;  
N'eo ket en eur drehi enebourien va bro,  
Mez kentoh, 'n eur houzañv eviti ar maro,

Eo e tlean beza da Zalver, Breiz-Izel !  
Me roio buhez dit, O ! va bro 'n eur vervel.

*(Hag e kan war don : Le tailleur, mez goustad ha trist :)*

*Klevet am-eus ouz va geroel  
Eun ene o vervel.*

Buannoh :  
*Ene Breiz edo o leñva  
Hag a leñv c'hoaz, kreñvoh-kreñva.*

*Klevet am-eus ouz va geroel*

Goustad  
*Eun ene o vervel.  
Eun ene o vervel.*

*Mouez va mamm eo, mouez va mamm Breiz,  
Va halon 'lamm em hreiz !  
Ne varvi ket, O ! va mamm-Vro,  
Me 'm-eus remed ouz da varo !...*

*Mouez va mamm eo, mouez va mamm Breiz,  
Va halon 'lamm em hreiz !  
Va halon 'lamm em hreiz !*

*Ouz da varo me 'm-eus remed :  
Gwad ruz va gwazied,  
Beteg an diweza berad,  
Me roio evidout va gwad ;  
Ouz da varo me 'm-eus remed :  
Gwad ruz va gwazied,  
Gwad ruz va gwazied.*

*(Taliezin en em ziskouez, o selaou, o selled) :*

*Ene va mamm me a ziframmo  
Euz liamm ar maro,  
Ha va ene eürusoh c'hoaz  
A nijo war-zu an oabl glaz.  
Ene va mamm me a ziframmo  
Euz liamm ar maro,  
Euz liamm ar maro.*

## PEMPED PENNAD

### TREMEUR, ARMEL, TALIEZIN

#### TALIEZIN

*(d'an daoulin dirag Tremeur)*

Me eo, me eo, Tremeur, an ene paour-ze !  
Beteg ennout eo bet douget, dre urz Doue,  
Va hlemmou pa edon bremaig, e-kreiz an noz,  
Pleget va chouk dindan n'ouzon peseurt malloz ;  
Mez divehiet on oll o selaou trouz da vouez :  
Euz ar malloz warnon ne zantan mui ar pouez ;  
Hag e seblant din kaoud bremañ 'vel diouaskell,  
Da alan o c'hweza enno 'vel eun avel,  
Eun avel d'am dibrad da nijal, drant ha skañv  
Da nijal 'n eur gana 'vel laboused an hañv !

#### TREMEUR

Mez piou out-te, va breur ?

#### TALIEZIN

Hel lavaret am-eus,

Me eo an ene paour, ene or bro, az-teus  
E-kreiz an noz teñval klevet oh hirvoudi !  
Gand an Drouized edon beteg-henn o pedi  
Doueou an dero braz ; mez va halon pell 'zo  
A-nebeudou, en em zistage anezo,  
Oh hedal eur gredenn dousoh d'an eneou,  
Hag eun Doue gwelloh eged o doueou !  
Ya, Breiz oll, dre va mouez, eo a oa o hervel  
Eun Doue all evid he mired da vervel !  
Gand an nebeud komzou am-eus klevet ganit  
Kement a zo ennon gand nerz ha joa a drid ;  
Rag en da gomzou c'hwek va spered a dañva  
Saour ar wirionez evid ar wech kenta !...  
Mez teh, ha teh buan euz al leh euzuz-mañ !  
Ouz da spia a zo tud bleizi dre amañ ;  
Soudarded 'zo kuzet a bep tu dre ar hoad,  
Mall ganto war ar mên aze skuilla da wad !  
Deuz a-heul ahanon dre eur riboul distro,  
Me hellfe da ziframm euz a skilf ar maro !  
Mez deus buan ; bremaig e vezo diwevad !

#### TREMEUR

O ! va breur bennoz dit 'vid da avizou mad !...  
Mez euz al lehiou-mañ, perag 'klaskfen tehel,

Ma'z int bet merket din gand Doue da vervel ?...  
Pa vin taolet warnout, na moug ha blod e vi,  
O ! taolvên vraz digriz, bremaig d'am izili ;  
Na skeduz 'vi bremaig da zaoulagad Jezuz,  
Pa ziruillo warnout a-boullou va gwad ruz !...

### TALIEZIN

Petra a hell renta ken dous dit ar maro ?  
Bev kentoh da veza silvidigez ar Vro !  
Bev pa'z eus en da wad nerz da zivenn or Breiz,  
Pa strink euz da henou evel sked goulou deiz,  
Pa bar da spered fur 'vel eun heol a lugern,  
Ma tridan dirazout, oll, spered hag eskern !  
Siwaz, ha red e vez e ve mouget kerkent  
Ar goulou a groge da bara war va hent ?  
O ! dre druez ouzin, hag euz meur a vil all  
A red, heñvel ouzin, dre an noz, 'vel tud dall,  
Den yaouank, n'ez ez ket d'en em rei d'ar maro,  
A-raog ma vo dre oll, o para war ar Vro,  
Ar sklêrijenn dinam a zantan en da greiz,  
'Vel euz eun heol divin, o sevel war Bro-Vreiz !

### TREMEUR

Ya, sklêrijenn divin war bro Vreiz a baro !...  
N'eo ket euz va buhez, breur, mez euz va maro  
E strinko dre an neñv ar sklêrijenn divin.  
Me eo ar goumoulenn a weler da vintin  
Dirag an heol evid e vired da bara :  
Teuzet ar goumoulenn, hag an deiz a sklêra ;  
Pa vo teuzet ivez mogedenn va buhez  
Neuze eo e savo war Breiz eun deiz nevez ;  
Neuze va zad Jildaz, gand e vouez entanet,  
A hwezo feiz Jezuz e-kreiz ar Vretoned ;  
Neuze, O ! drouiz yaouank, war da benn e weli,  
Splann ha dudiuz oll, heol Jezuz o skedi !

### TALIEZIN

Jildaz ! Piou eo hennez ?

### ARMEL

N'hen anavezez ket ?  
Jildaz eo nerz Doue en on touez, degaset  
Da blega penn an oll dirag ar Groaz kristen ;  
Sellou e zaoulagad 'zo 'vel diou luhadenn,  
E vouez he-deus galloud ar gudurun pa groz ;  
Kestell brezel a freuz dindan pouez e valloz ;  
E vantell, pa he zaol d'an avel war ar mor,

A gerz evel eur vag gand he goueliou digor.  
Ha dre ar bed krouet n'eus galloud den na tra,  
Pa zav Jildaz e vreh, kement na rank plega.

**TALIEZIN**

Hag e peleh e chom an den burzuduz-se ?

**ARMEL**

Ema dre ar hoadou en tu bennag aze !

**TALIEZIN**

O ! Jezuz a halvan evid ar wech kenta !  
Va renit, me ho ped, dre an hent ar berra  
Evid ma hellin kaoud, hag el leh-mañ degas  
Da zavetei Tremeur, da servicher Jildaz !

*Fin an eil Arvest*

## TREDE ARVEST

D'an trede arvest, Tremeur, Taliezin hag e vignoned a zo kouezet etre daouarn ar Hont hag an Drouiz ; emaint dirag an daolvên; ema ar zakrifis o komañs, pa zegouez Jildaz ; Konomor a deh gand ar spont ; Tremeur, entanet e galon gand mouez ar zant braz, a grog en eur hleze, prest da stourm.

Mez o houzoud<sup>21</sup> eo mab da Gonomor, ar mezusa muntre a 'zo bet biskoaz, ar zant yaouank a zo mall gantañ mervel evid kuzad euz an dizenor ! En em lezel a ra gand Konomor, a zibenn anezañ war an daolvên gand eun taol kleze !

Kerkent, liammou Taliezin a gouez ; sklêrijenn ar Feiz, a oa pell 'zo o klask ene an Drouiz yaouank, a bar bremañ war e spered : gand gwad Tremeur, prenet ene Taliezin, ha mouget ar relijion goz ; prenet ivez ar bobl oll ; rag Taliezin, er pez-c'hoari-mañ, n'eo penn-da-benn nemed skwer ene Breiz o tilezel an doueou faoz evid ar gwir Doue !

## KENTA PENNAD

### GWENHLAN

*hag e zrouized; TALIEZIN, hag e re, liammet o zreid hag o divreh; TREMEUR, er memez doare; KONOMOR, SOUDARDED.*

### GWENHLAN

Or spered re vuan en-doa kemeret neh ;  
Doueou on tadou-koz eur wech c'hoaz a zo treh !  
Gand Drouized an dero e chomo ar gounid ;  
Hervez al lezenn red, greet e vezo al lid,  
A dle da virviken, war eneou ar bed oll,  
Diazeza galloud doue santel an heol !...  
E-harz an daolvên zakr, setu amañ Tremeur  
Ha gantañ ar pemp drouiz treitourien d'o breudeur.  
Ar re-mañ o-deus c'hoaz etre daou da zibab :  
Rei dorn da Gonomor da skuilla gwad e vab,  
Pe war an daolvên zakr, o-unan hep truez,  
Renta d'an doueou o gwad hag o buhez !

### TALIEZIN

N'eo ket dremm ar bourreo, na dremm griz an ankou,  
A rafe din kemer perz en da dorfedou ;  
Setu va halon noaz : Bourreo, sko pa gari !

### GWENHLAN

Anzav, evelato, n'eo ket eur seurt c'hoari  
E oas-te o hedal, paour-kêzig didalvez,  
Pa gredes sevel deh ken divergont da vouez ;  
Esper az-toa da gaoud, o tehel diouzin,

---

<sup>21</sup> o houzoud : fazi a-bell 'zo : pa oar...

E-leh noz ar huz-heol, ar sklêrijenn vintin !  
E noz du ar maro bremaig 'vi sebeliet ;  
Euz komzou an Drouiz koz en-doa da genteliet,  
Neuze 'teuio soñj dit, ha na pebez kerse,  
O den yaouank diboell, 'zavo ennout neuze !

### TALIEZIN

Sko ! sko ! 'lavarar dit ; mall 'zo gand Taliezin  
Mond da glask er bed all ar sklêrijenn vintin ;  
Bet am-eus bet hirio an disgwel anezi ;  
Mall eo d'am daoulagad en em beurzigeri !

### GWENHLAN

Oll en o fallentez a fell deoh kenderhel ?

### AN DROUIZED YAOUANK

Oll, gand Taliezin, ni a houlen mervel !

### GWENHLAN

Drouized chomet fidel, trohit euz an dervenn  
Beb a gurunenn hlaz da lakaad war o fenn !  
Konomor, chom amañ gand ho kleze dispak,  
D'o skei, pa vezint prest, e-harz an daolvên zakr !...  
E-pad an amzer-ze me 'gano, d'ho kedal,  
Eur han reizet hervez lezenn barzed gwechall,  
Eur han da eneoù on tadou, d'o gervel  
Da zinijal amañ euz ar bevar avel ;  
Eur han d'on doueou d'o lakaad da ziskenn  
War douar Breiz-Izel, da skoulma da viken,  
Etrezo hag etre spered ar Vretoned,  
Al liammou nevez gand ar gwad siellet.

*(Hag e pign war an daolvên)*

*War eun ton nevez :*

*Diredit oll, c'hwi brezellourien goz  
A houren c'hoaz, war lein goabrenn an noz,  
Gwad en-dro deoh o redeg a-boullou,  
Ken eo ruz-beo tachenn hlaz an neñvou.*

*C'hwi, Drouized vraz, a red goustad ha sioul,  
'Rez ar pradou, war karrig ar houmoul,  
Gand an avel o trei ken skañv e rod,  
Ma ne weler e roud war gliz ar yeot ?*

*C'hwi, doueou, a zo e pep tra oll,  
En neñv o rei nerz ha gor d'an heol,  
E dorn an Drouiz da rei mouez d'e delenn,  
Hag en douar, da rei mel d'an dervenn.*

*Deuit ! ma skignfot dre bevar horn ar vro,  
War an heol sakr, an dud hag an dero,  
Ar hlizienn hoad, ouzim, 'vid ma teho,  
Bugale Vreiz, speredou ar maro !*

*(Jildaz a zegouez, heb beza gwelet!)*

### **GWENHLAN**

*a gendalh.*

Eneou euz a beb oad, eneou euz a bep stumm  
Euz ar bevar avel, en-dro deom 'n em zastum,  
Emaint oll en-dro deom oh hirvoudi, war gren,  
O hedal an darvoud a dle amañ tremen.  
Hag uhelloh, en oabl, an doueou o-unan,  
Euz goueled an neñvou, 'deu da zelaou va han.

### **JILDAZ**

*(oh ober sin ar groaz war an neñv)*

Dre urz an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel,  
Speredou diredet war pevar avel :  
Gand sin kroaz va Jezuz, me ho skub ahalenn,  
'Vel 'vez gand an avel skubet ar goumoulenn !

*(Konomor a wel neuze Jildaz ; leusker a ra eur griadenn ;  
Gwenhlan a dro e benn, hag e wel ivez ar manah ; diskenn a ra ivez diwar an daolvên.)*

### **GWENHLAN**

Piou eo ar penn moal-mañ, den dizakr ha divez  
'Touez an Drouized santel a gred en em ziskouez ?  
Spontet gand trouz e vouez, speredou on tadou,  
A zinije 'vid or zelaou, a-vagadou.

### **JILDAZ**

Penn moal ! Te eo hirroh da vleo 'ged da varo :  
Mez hirroh da halloud n'eo ket evelato !  
Gand da vleo hir bremaig, ha gand da varo kaer,  
Te 'yelo da weled peleh, gand ken braz herr  
Eo tehet dirazon da zoueou spontig :  
En ivern, 'vid o hlask, me da gaso bremaig.

### **GWENHLAN**

Kentoh war an daolvên, pell a oa dizehet,  
Da wad a ziredo, 'vid gwalhi da behed !...  
Konomor, krog ennañ, ha gra dezañ renta  
A-raog skei ar re-mañ, e vuhez ar henta !



## JILDAZ

Konomor 'n-eus desket a-bell 'zo petra dalv  
Da houarn na da zir steki ouz pennou moal !...  
Dalh soñj euz da gastell diskaret en e boull,  
Skoet gand nerz va mouez kreñvoh 'vid an tan-foultr !  
An ano 'zo a-walh 'vid lakaad da dehel  
Speredou an êr dre ar pevar avel,  
A hellfe, en douar, dindan ho treid, kerkent  
War-eeun d'an ivern digeri frank an hent ;  
Hag eno, a-dra-zur, d'ar hont-meur Konomor  
E-touez ar pennou braz 'vo roet eur gador !...

Skrija 'rafe er hoad an oll loened gouez ;  
Gand va mouez, 'n eur yudal, eh unanfent o mouez,  
Ma vefe displeget dezo da dorfedou !  
Ma vez stlapet outañ stlabez da behedou,  
A-walh 'vez anezo 'vid saotra an oabl glaz,  
Ha mougla sklêrijenn an deiz evid biskoaz<sup>22</sup> !

En ano an Doue, mestr ar bed, e komzan,  
'Ma Doue o sevel, gantañ gwalinier tan ;  
Me a glev dre an Neñv o tond, en eur hourdrouz,  
Mouez ar hudurunou dindan ar hoabrenn rouz ;  
Me a wel, pleg-displeg, euz ar goumoulenn zu,  
Luhadenn e gounnar d'az renta e ludu.  
Warnout, ne zantez ket an arne o poueza,  
Ken ponnner ma'z eo sklêr eo prestig da goueza ?  
Gand da fallagriez, bemdez e pounnera,  
Bemdez e kresk fulor an tan prest d'az flastra !

## KONOMOR

Drouiz Gwenhlan, d'am zikour galv 'ta da zoueou !  
Krena 'ra va zamm korv evel eur bern deliou !  
Dervenn vraz ha santel, gand da skourriou ledan  
Divenn an denig paour a zo amañ dindan !  
E zellou a zev din va daoulagad ! Peleh,  
Dirag spont ar vouez-se, 'kemerin-me an teh ?

*(Lezet en-deus e gleze da goueza ; Jildaz a grog ennañ,  
a droh liammou Tremeur, a ro dezañ ar hleze, hag  
a ra dezañ pignad war an daolvên uhel !)*

## GWENHLAN

*da Gonomor*

Den muioh digalon, eged eur plah netra<sup>23</sup> :  
Setu kollet ganez ar sikour ar hreñva,  
A helle da zivenn ouz taol da enebour !

---

<sup>22</sup> evid biskoaz : fazi. Evid da viken.

<sup>23</sup> eur plah netra : iskiz. Eur plah ha ne dalv netra.

Euz a-berz an doueou perag goulenn sikour,  
Pa oa 'tre da zaouarn, 'vid diskar ar penn moal,  
Ar hleze n'eo ket bet c'hoaz trehet gand unan all,  
Ar hleze a zalhas dorn Arzur e-unan ?

### JILDAZ

Ema bremañ etre daouarn e vab-bihan,  
Tremeur, en da zaouarn kleze ar Rouaned,  
O hleze en da zorn, hag en da wazied  
O gwad ivez, va mab, gwad Romaned gwechall,  
Kleze ha gwad n'ez eus na kleze na gwad all  
A hellfe o zrehi dindan bolz an neñvou !  
Gand kleze braz Arzur, trohet da liammou  
Stlap pell ouzit bremañ mantell baour ar veneh !  
(Hag an den e vantell gand Tremeur).

O ! Roue, sav da benn ; brezelour, sav da vreh !  
Diskouez ar stern brezel, greet gand dir ha gand aour,  
A wisker dit bemdez dindan da zillad paour !  
Deut bremañ, c'hwi, Kont-Meur, ha c'hwi, tud didruez,  
Gand mab ho Rouaned da lemel e vuhez !  
Te 'gave dit, kiger, kaoud da gontella  
Eun oanig na ouezfe nemed klemm ha krena :  
Ha setu dirazout, gantañ savet e bao,  
Eul leon, skilfou dir dispak gantañ ker brao !

*(Tremeur, war urz Jildaz, en-deus taolet e vantell ;  
ema war an daolvên, gand e stern brezel skeduz,  
oh heja kleze Arzur).*

### TREMEUR

O ! kleze, peseurt tan 'oa kuzet en da droad ?  
Kerkent m'en-deus va dorn kroget ennout, va gwad  
A dreuz va gwazied 'zo kroget da vervi !  
Soñjou du ar maro, 'vel eur vandenn vrini,  
Pell, pell euz va spered o-deus tehet kerkent !  
Em halon nevezet ne chom mui diagent  
Nemed c'hoant da veva, c'hoant da vond dre ar bed,  
Em dorn kleze Arzur, o taol tan ha luhed !

### ARMEL

Dalh 'ta, va breur ! Dilamm euz an daolvên haro,  
Distag da vuzell flour euz evaj ar maro !  
Lez da gregi ennout sehed yah ar vuhez !  
Êzenn fresk an esper war da galon a hwez :  
List' hi da zispak dit da askell 'n eur dridal,  
List' hi d'az tibrada dre an oabl da nijal !...

Gand da stern a vrezel na pegen kaer out-te,  
Da zremm flamm o para ouz sked dir da gleze !

### TRIEMEUR

Ya ! douar va havell, n'eo ket dre va maro  
Eo e fell din bremañ da zervicha, va Bro !  
Doue en-deus lakaet gwad em gwazied din,  
Doue en-deus c'hwezet tan din 'leiz va feultrin !  
N'eo ket eun oan aonig en-deus greet ahanon ;  
Din e roas skilfou ha kalon eul leon !  
Ar bed oll o krena dirag va hleze noaz,  
O ! Jezuz, a zoublo bremaig dirag da groaz !  
Mar deo kurunennou, Konomor, a fell dit,  
Deus da heul va hleze dre ar bed d'o gounid !  
Deus ganeom, ha tro kein da veleg an dero,  
En em daol ganeom-ni e-kreiz an avel-dro,  
Evid beza sammet gantañ, dre an neñvou,  
Dreist troniou an douar hag o hurunennou !

### GWENHLAN

Va den, a-benn ober d'ar Hont eur seurt pedenn,  
Ha te a oar piou eo ar Hont, ha peseurt den ?

### TREMEUR

Penaoz e hellfen-me anaoud ar Hont-meur ?  
E-touez ar pennou braz 'n em-eus bevet nemeur.  
Gouzoud a ran hepken eo eur brezelekaer<sup>24</sup> ;  
Hervez ar pezh am-eus lennet em levriou kaer,  
Eur seurt den 'dle ennañ beza kalon uhel,  
War varh kerkent ma son trompillou ar brezel,  
Euruz pa zav er vro eur Roue kaloneg  
D'en em deuler d'e heul dre ar bed da redeg,  
Evid divenn a zroug gwiriou an dud netra<sup>25</sup>,  
Diskar an dud uhel a oa ouz o flastra ;  
Ha dreist-oll 'vid lakaad, war oll boblou ar bed,  
Da ren ar Hrist-Doue, Roue ar Rouaned !

### GWENHLAN

Mez ma vez ar Hont-Meur unan euz an dud-ze,  
Na garont ken c'hoari nemed c'hoari kleze,  
Da doulla da hemañ e galon, goude-ze  
Da droha da hennez e benn war e ziskoaz ?  
Ma ne vez bet ar Hont 'med eun den a-viskoaz  
Touellet da laza, da zistanka ar gwad,

---

<sup>24</sup> eur brezelekaer : brezeler (ger iskiz).

<sup>25</sup> an dud netra : an dud n'o-deus netra.

Ken a lez e pep hent, 'leh ma taolas e droad,  
Roudou gwadiellet<sup>26</sup> er vouillenn hag er pri :  
Ha te a lakfe c'hoaz da zorn en e hini ?

### TREMEUR

Ya, va dorn a rafen, a-raog e gas d'ar groug,  
Da skoulma ar gordenn<sup>27</sup> dezañ ouz e houzoug !  
Eur Roue, daoust ma tle d'an oll dud beza tad,  
A dle skei ar re fall 'vid divenn ar re vad !

### GWENHLAN

Ahanta, Konomor, ha dihuna a ri ?...  
O weled er paotr-mañ kemend a goantiri,  
Ennout, 'gav din, oa krog an deneridigez,  
Hag a deuze dija ennout da galon ouez,  
Gand komzou ar paotrig, ennno mesket ken brao,  
Evid da douella, mel flour ha tan bero.  
Bremañ 'welez eo red pe laza pe mervel ;  
Mez ged c'hoaz eur pennad, ma vo dit roet ar gwel  
Euz ar pezh 'zo kuzet evidout e kalon  
An neb a ginnige da gemer da vignon !...

Tremeur, petra 'ri-te, pa vi roue eun deiz,  
Ma teufes da gaoud, e-touez sujidi Vreiz,  
Unan hag en-defe bet ar fallagriez,  
Eñ 'savet a netra, da vond d'en em ziskouez  
Dre baleziou ar vro, 'touez an dud-chentiled,  
Da douella enno c'hweh a zimezelled,  
Da eureuji ganto an eil goude eben,  
'Vid o laza gand o bugel, war eun daolvên !...

### TREMEUR

O ! Drouiz, te a gont din sorhennou bugale  
Evid lakaad amañ ahanon da zale ;  
Biskoaz ne vo kavet<sup>28</sup>, e-touez oll ouenn an dud,  
Eun den treh e grizder d'an anevaled mud !

### GWENHLAN

A ! kalz traou, gand Jildaz, a zo bet dit desket,  
Mez her gweled a ran, ar manah n'en-deus ket  
Disklêriet dit traou all, mad ivez da houzoud !

### JILDAZ

---

<sup>26</sup> gwadiellet : ger ijinet. Leun-wad.

<sup>27</sup> va dorn a rafen, ... Da skoulma ar gordenn : "rafen" : iskiz. "lakfen".

<sup>28</sup> Biskoaz ne vo kavet : Biken .. ;

Tav, den kriz ! Na ro ket d'ar paotr da anaoud  
Traou hag a ve goude, war ar spered, evel  
Bilim tan da zevi e eskern hag e vel !

### GWENHLAN

Manah, te 'gave dit, dre da hourdrouzou gouez,  
On trehi, ni on-daou, gand ar spont hag ar vez.  
Ha te a gave dit, paour-kêzig krouadur,  
On diskar 'n eur hoari gand kleze koz Arzur !  
'N em-eus nemed eur gomz da lavared, d'am zro,  
'Vid ho trehi ho-taou, ha rei dit ar maro ;  
Eur gomz evid krenna da skilf, ha da askell,  
A oa dispak ganez 'vid nijal ken uhel,  
Goude beza skoet ahanom da vervel !  
Gand eur gomz e ouezin en tan e-kreiz da vel,  
Eun tan ha na hellfe ar mor oll da vouga  
P'en-do, e-kreiz da wad, gellet en em zila !  
Sed' amañ anezi : an den ken dinatur,  
N'en-deus anavezet biskoaz ken plijadur  
Nemed o tispenn kig an dud gand e gleze,  
An den-ze eo hennez 'zo dirazout aze !  
Hag an den-ze en-deus skoet, war an daolvên,  
C'hweh pried da vervel an eil goude eben :  
An den-ze eo da dad, O ! mab-bihan Arzur !...  
A ! koueza 'ra da benn, a zavez ken asur,  
Gand an taol-mañ am-eus dahet<sup>29</sup> dit 'kreiz da dal !  
Digor bremañ eta da askell, 'n eur strakal,  
Dispak bremañ da skilf, O ! leon gallouduz !...  
Setu sklaset da wad, den yaouank froudennuz ;  
Mouget eo da ourgouill, O ! mab-bihan Arzur,  
Gand ar vez da veza mab d'eun den ken hudur !

### TREMEUR

O ! Jildaz, O ! Jildaz, astenn din 'ta da zorn !...  
Ya, sklaset eo va gwad, brevet eo va askorn !  
Gand an teod-mañ, soubet e bilim an ivern,  
Eo silet ar maro din e-kreiz va eskern !  
Gand an teod-man, soubet e bilim an ivern,  
Eo silet ar maro din e-kreiz va eskern !  
A ! lavar din eur gomz, lavar n'eo nemed gaou,  
Ar pezh emañ bremañ oh ehan selaou !

### GWENHLAN

A ! devi 'ra an drein am-eus sanket ennout !  
Evid da zizreina, Jildaz 'zo dihalloud ;

---

<sup>29</sup> dahet : ? (taolet).

Va homzou 'zo gwirion, den n'o dislavaro,  
 Gwaz-a-ze ma'z int dit eur bilim a varo !  
 Euz an evaj treñk-mañ, pa'z eo stag da vuzell,  
 Beteg al li<sup>30</sup> 'vo red dit riñsa da skudell !  
 Ya, te hag a zave ken braz lorh en da greiz  
 O soñjal out ganet euz a gaerra gwad Breiz :  
 Te 'zo mab d'ar villa, ha d'an izella  
 A zo bet o veva war an douar biken<sup>31</sup> !  
 Konomor 'zo hizio azezet war eun tron,  
 Den ne oar euz a biou en-deus sunet ar vronn.  
 Eun deiz 'm-eus e gavet e-kreiz eur hoad teñval  
 O redeg, noaz ha gouez evel eun aneval ;  
 Me am-eus e zavet, furmet korv hag ene,  
 Evid beza em dorn a-eneb da Zoue,  
 Eur benveg prest bepred da skei ha da laza ;  
 Dreizon-me eo pignet d'ar reñk an uhella,  
 Dreizon-me 'n-eus gellet, e ti ar Rouaned,  
 En despét da Jildaz, goulenn ha kaoud pried,  
 Evid kaoud da ginnig da zoueou an daolvên,  
 Evid ol lidou sakr, gwad bugale kristen !  
 Da vamm-te da-unan, merh da Gont Meur Gwened,  
 Rouanez dre he gwad koulz ha dre he hened :  
 Ya, da vamm, eun nozvez, amañ, euz dorn da dad,  
 War ar mên 'maout warnañ, he-deus skuillet he gwad !  
 Te da-unan, erfin, a-raog zoken genel<sup>32</sup>,  
 Eo bet red da ziframm a-zindan e gontell !

### TREMEUR

Allaz !... N'eus mui ezomm euz dir na kontilli  
 'Vid treuzi va halon, dispenn va izili !  
 Abaoe mil bloaz 'zo ma 'z eus war da daolvên  
 Tud o skuilla o gwad, bez sur, Drouiz, n'eus bet den  
 Hag a ve 'vel din-me, bet ganeoh bourreviet,  
 En e galon kemend a liammou brevet !  
 An ourgouill marteze o c'hweza din em hreiz,  
 'Vel eul labous yaouank pa gimiad euz e neiz,  
 E saven dre an neñv, 'vel mezvet gand ar joa  
 D'en em zantoud bepred uhelloh-uhella !  
 Va spered a nije ken herr ha ken diroll,  
 Ma tizis pell du-hont 'leh 'ma sked, 'vel an heol,  
 Gloar divarvel Arzur dreist an oll rummou tud !  
 Eur pennad war va zal e paras sked e vrud ;  
 Gand eur barr aour kouezet e goueled va halon,

<sup>30</sup> Beteg al li : galleg. Beteg al lehid.

<sup>31</sup> biken : fazi : biskoaz.

<sup>32</sup> a-raog zoken genel : fazi : a-raog beza bet ganet.

Gwad va zad-koz Arzur en-deus tridet ennon.  
En eur-ze ne oa den a-zindan bolz an neñv  
Ken birvidig e wad, ken laouen e ene !

Da vouez, o skei warnon, 'vel kurun, stank-ha-stank,  
Euz bolz glan an neñvou am diskar 'kreiz ar fank !  
Hag e santan, ken rust ma 'z eo bet din va lamm,  
Euz ar vuhez ennon eo torret peb liamm !

Kenavo a rankan lavared d'ar vuhez<sup>33</sup> !  
Deh, heb klemm hag heb poan, am-ije euz ar bez  
Gwelet breh an ankou 'n em astenn d'am hemer,  
Da falha d'am buhez he flantennig tener !  
Deh 'vel eur vleunennig, heb bann heol na bann gliz,  
D'an douar da vervel 'stoue va fennig skuiz.

Hirio, pa deue din euz an neñv mil glizienn,  
Pa lugerne ken flour barrou an heol laouen,  
Pa bigne em halon, euz eienennou mae,  
Dour nerzuz ar vuhez, O ! na kriz eo din-me,  
Va Doue, 'n em lezel gand falh 'dal an ankou....  
N'eus forz, klemmadenn 'bed ne zeuy euz va genou ;  
Krisoh eged houmañ eo bet hoh angoni,  
Ha pounnerroh eo bet ho kroaz 'vid va-hini !

### TALIEZIN

Piou en-deus da rentet ken gwan, ken kizidig,  
O ! brezelour yaouank a welen bremaig  
Nerzusoh ha taerroh 'vid Doue en emgann,  
Da lagad, da gleze, o-daou o teuler tan ?  
Penn-kil-ha-troad, da gorr ouzit 'zo dihouli,  
Sonn da benn war da skoaz, ha yah da izili !

### TREMEUR

Gouliou 'zo diouto kalz dièsoh herzel  
Eged ar gouliou a zispenn eun ezel  
Nag ar re a dreuzfe zoken kalon an den !  
Ar gouliou-ze a jom diremed da viken !  
Ganto on bet tizet ; gouliet va enor,  
Pa'z eo re wir, siwaz ! on mab da Gonomor !

### KONOMOR

Mez eo dit klevoud piou az-teus-te bet da dad ?  
Mez eo dit va gweled dindan da zaoulagad,  
Mall eo dit er maro mond da guzad da vez ?  
Gortoz ma da stlapin eta raktal er bez !

### JILDAZ

---

<sup>33</sup> Kenavo a rankan lavared d'ar vuhez : fazi a bell 'zo : kenavo da...

*da Gonomor*

War da giz ! pe kerkent, e noz du ar maro,  
A-raog da vabig paour eur ger da ziskaro !

### TREMEUR

Ya, ged c'hoaz ; rag ne gouezo eur vlevenn euz va fenn  
E-pad ma vo em dorn an dir-mañ d'am divenn !  
War ar mên va-unan bremaig en em ledin :  
Mez a-raog, eur pennad 'fell din, war va daoulin,  
Va Doue ha va mestr, 'n em deuler dirazoh.  
*(Hag e taoulin).*

Em halon 'barz mervel, ma tiskenko ho peoh !  
Re a drubuill a zo bremañ war va spered,  
Evid soñjal ennon va-unan 'giz m'eo red,  
Pa 'ma ouz va gervel mouez êled ar maro !  
Soñjou euz a bep seurt a zo re war va zro !  
O has kuit a fell din 'vid ma ne chomo mui  
Nemed eur zoñj ennon : Jezuz, hoh hini-c'hwi !  
Tehit ouzin eta, oll zoñjou ar vuhez !  
An eil goude eben, tehit, pep c'hoantegez !

### TALIEZIN

O ! na digar out-te evidon-me, Tremeur !  
Perag rei din bremaig an ano dous a vreur  
Mar deo kerkent, siwaz ! evid va dilezel,  
Ha dilezel ganen or mamm-Vro Breiz-Izel ?

### TREMEUR

An den ne oar morse pe mervel pe beva  
Dezañ ha d'ar re-all eo an talvoudusa !  
Bremaig me a wele, evel dre eun huñvre,  
Dreist ar menezioù Du ha menezioù Are,  
Dispak d'am daoulagad oll douar Breiz, va Bro !  
Penn-da-benn dre enni 'oa digor eun *Ero*,  
Eun *Ero* don, ledan hag hir, ken e tize,  
A-dreuz ar menezioù, euz eur mor d'egile !  
Hag e seblante din e oa an *Ero-ze*  
Roet din da frankad c'hoaz, gand beg va hleze !  
Gweled a ran bremañ n'eo ket eur hwezenn zour,  
Nag ivez eur vuhez a stourm hag a labour,  
Eo am-eus-me da rei da zouarou va Bro :  
Va gwad eo a rankan skuilla 'kreiz an *Ero*,  
Va gwad 'vid ma savo, euz peb gliziennig ruz,  
'Vid poblou Breiz-Izel, pennou-ed puill ha druz !  
Doue, gand va maro ha gand va angoni,  
C'hwi 'raio eul labour kaeroh 'vid an hini  
A rafen-me 'vid Breiz gand nerz va yaouankiz !



Dindan beh ar pehed, ar bed dinerz ha skuiz,  
A bareas gwechall gand gwad ha kroaz Jezuz,  
Ha nann dre vurzudou eur hleze gallouduz !

M'ho ped eta, Jildaz, va lezit da vervel !  
Gand ho mouez vurzuduz, na'z it ket da hervel  
Nerz Doue d'am diframm euz a skilf ar maro ;  
Ar vuhez a ve din re griz ha re hwero :  
E sioulder ar maro, va lezit da ziskenn,  
War galon va Doue, da yac'haad va anken !

### JILDAZ

Ya, va mab, re sklêr eo, youl Doue e-unan  
Eo a verk an eur-mañ evid da dremen van ;  
Diskenn e peoh er bez, va mab ha va Roue !  
Pe gentoh, dispak frank askilli<sup>34</sup> da ene,  
O ! merzer Breiz-Izel, evid nijal d'an neñv ;  
Evid nijal d'an neñv, dispak da askilli,  
Da askilli ruz-tan ha gwenn 'vel al lili,  
Gwenn dre ma varvez gwerh, ruz dre ma 'z out merzer !

Mez diwall da gredi, Drouiz fallagr ha muntrer,  
E tigo e wad an hent, 'vid an distro,  
War zouar Breiz-Izel d'az toueou maro !  
Peuriverniet e vo bremañ da zoueou faoz !  
Euz gwad Tremeur e sao an diweza malloz,  
A dle poueza warno evid o chadenna  
Da viken e goueled an ivern an donna !

Ya, gwir eo, gwad Tremeur, hervez da brofetiou,  
A vo silvidigez ha buhez d'an eneou ;  
Diframmet 'vint bremañ a-zindan an dero,  
'Leh ma krene ar ouenn gand terzienn ar maro,  
Hag e pignint war gern an torgennou uhel,  
Da reseo sklêrijenn Jezuz, an Heol santel !

### TREMEUR

Galvit, 'tre ho tivreh e joa ar Baradoz,  
Ganeoh, O ! va Doue, va ene da repoz !...  
Me a zeblant din klevoud evel mouez eneou  
O skuilla en-dro din oll hwez vad an neñvou !  
Va resevit ganeoh, O ! eneou divlamm !  
N'emaoh-c'hwi ket ganto, ene santel va mamm ?  
Deuit evid sikour ho mabig da zevel,  
Va askellig harpet ganen ouz hoh askell !...

Bremañ, kleze Arzur, euz va daouarn a gouez !  
Gourvez a ran laouen a-hed an daolvên ouez !

*(Gourvez a ra).*

---

<sup>34</sup> askilli : eskell.

Na kriz eo koulskoude soñjal e tle va gwad,  
Redeg amañ bremaig dre da zorn, o va zad !  
Diegi 'm-eus bremañ da lezel da goueza  
Va hleze koz etre da zaouarn d'am laza !  
O ! euzusa torfed, O ! spontusa maro !  
*(Sevel a ra adarre).*  
N'em-oa evet nemed beteg al li c'hwero,  
Ha setu em halir bremañ ar pep treñka ....  
Ma hellfe va maro beza da vihanna  
Euz da oll dorfedou, siwaz, eur binijenn  
A-walh evid pellaad dorn Doue euz da benn !  
A ! ma hellfe va gwad, va zad paour, da walhi !...

### GWENHLAN

Konomor, lavar din, ha pelloh e chomi  
Da zelaou, 'vel eur peul, komzou goullo da vab,  
Keid-all zo war ar mên, ouzom oh ober goap ?  
Kerz d'hen diskar kerkent, ha diwall da grena !  
Kerz, ha kas d'ar bed all he mab da Drifina !  
*(Amañ e kouez ar hleze euz dorn Tremeur).*

### KONOMOR

*(er-mêz anezañ e-unan)*  
Trifina ! Trifina, bourreo va zamm buhez !  
Setu dirazon c'hoaz da ene didruez ....  
Gwenhlan, ne welez ket aze, war an daolvên,  
Trifina gourvezet, he mab en he hichenn ?  
Ar memez gwad bepred euz he gouli a red.  
Gwad milliget, bera a ri eta bepred ?  
Ennout 'yelo bremaig beg va hleze ken don.  
*(Astenn a ra ar hleze).*  
Ma evo ar restad euz gwad ruz da galon :  
...Dalv, viltañs milliget !... Ha dalv, te, prezeger !  
*(Skei a ra daou pe dri daol).*  
War barlenn flour da vamm, te a gousko emberr !...  
... Setu da benn d'an traoñ a-ziwar da ziskoaz  
Ha da henou serret d'am gourdrouz da viskoaz<sup>35</sup> !...

### TALIEZIN

O ! burzud !... Kouezet eo liammou on daouarn,  
Evel pa vent trohet gand eul laonenn houarn !  
Ar memez taol kleze en-deus da zibennet,  
Bugel santel, en-deus ni on dichadennet !...  
O ! korv maro, peseurt galloud a zav ouzit ?  
E leh leñva d'am mignon paour, ennon e trid

---

<sup>35</sup> da viskoaz : da viken.

Gand joa, en despet din, va halon em feultrin !  
Peseurt nerz a ra din koueza war va daoulin ?

*(En em daol a ra d'an daoulin).*

C'hoant ganin, 'vel eur hi, staga va muzellou  
Da eva ar vuhez a red euz da houliou !  
Peb gouli 'zo ennout eun eienenn vuhez,  
O teuler gand ar gwad, dour ar zilvidigez !...  
Ene Breiz o hedal pell 'zo ar sklêrijenn,  
Sell-hi o sinkla dit, 'vel euz eun eienenn,  
Euz ar gouliou ruz-mañ, ruz 'vel faoutou an neñv,  
Pa deu er volz vintin da bara goulou de(iz) !...

Bremañ e welan sklêr petra eo an Heol-ze  
A oa, heb e anaoud, o hervel va ene.  
Doue kristen, te eo, te eo an Heol skeduz  
A welen keid-all 'zo em huñvreou burzuduz !  
Te eo am-eus pedet gand va zelenn bremaig,  
Ha dit eo e fell din kana c'hoaz va hantik :

*Dre oll e trid ar mêziou.  
Me glev an alhweder o kana,  
War-nij, dreist ar menezioù,  
Da hervel goulou deiz da bara ;  
Tridal a ra va gwad ha va spered,  
Kan dudiuz a voud em halon ;  
Heol burzuduz, strink da sked  
Ma paro 'dudi an deiz warnon !*

Ene Tremeur, d'an Neñv, o paouez da zevel,  
Eo an alhweder-ze a dlee da hervel !  
Pa 'z eo savet, setu-te o strinka dre-oll  
Dre Vreiz da sklêrijenn, O ! dudiusa Heol !

*Du-hont, war gern ar menez,  
Setu-c'hwi o skedi, Heol laouen,  
Heol glan, deiz al levenez !  
Diskenn e strad teñval an draonienn !  
Pobl o leñva e-kreiz noz ar maro,  
Tavit, setu an Heol o sevel ;  
A-dreuz da goadou dero,  
An Heol a bar warnout, Breiz-Izel !*

Ya, Breiz oll 'zo bremañ, hag a vo da viken,  
O veva, o tridal dindan da sklêrijenn !  
Breiz eo ar horn-douar a zalho da bara  
Warni, O ! Heol divin, da sked dudiusa !  
Neb leh ne vo gwelet kemend a eneou  
Dreizout o vleunia stank warno bleun an neñvou !  
Neb leh ne vo gwelet irvi toullet ken don

Ha trempet, ma vez red, gand gwad pur or halon  
'Vid ma savo warno, gand nerz da hor, O ! Heol,  
Ed puill da rei bara da eneoù ar bed oll !

FIÑVEZ